

Breizh Brevez

EUGÈNE LUNVEN
SON AN ENEZENNOU

Visant Seite

REDADEG KILLOG

Visant 'n Askol

EUR VEDAENN ISKIZ

N° 63 - 1983

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

Niverenn 63.

Miz meurzh 1983.

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- studierien: 50 lur.
- broiou estrañjour: 100 lur.

Eur houmanant a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennoù-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Ar chekennoù-post a zo da veza lakaet war K.R.P.: « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro. da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Disklêriet hervez al lezenn: kenta trimiziad 1983.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

† Naig Rozmor: Dievezted.....	3
✕ Eugène Lunven: An enezennou.....	4
† Y. Miossec: O haloupad war henchou Breiz-Izel.....	7
✕ V. Seite: Redadeg killog.....	12
Yvonne Cochard: Bleizig va zad-koz.....	25
Visant 'n Askol: Eur vedalenn iskiz.....	29
✕ F. Falc'hun: Notennoù war an anioù-leh keltieg.....	36
† Mikael Madeg: Komzou didro.....	39
✕ Euz an eil devez d'egile.....	45
✕ Rentaou-kont.....	51

Dievezted

E koun Per-Mari Mevel.

N'om-boà ket klevet karr an Ankou o tostaad ken lirzin e kane ar stivell e traoñ an hent.
N'oa ano ganeom nemed euz an nevez-amzer a veze santet dija oh ober e reuz dindan an douar skornet hag e goudor kuz or gwazied.
An nevez-amzer hag a ro kement a labour d'ar barz!

Edom prest da vond d'e heul war ar prajou da spega bisigou ouz an haleg, da fera diouaskell bleuniou al lêz ha da fêcha eun neiz bennag d'ar goukoug alouberez.
Edom prest d'en em deuler a-bez el levezeg veur war-nez tarza endro deom.

Penaoz or-bije gwelet, oh en em leda en dremmwel, eur valkenn zu dougerez a varo? Ha pegen dizivenn oam pa zaillas war e breiz gand e virou lemm!
Youhet em-eus: Nann, pas c'hoaz! Gortoz ma vezo speget ar bisigou! Bisigou...ou...ou e-neus respontet goapauz an hekleo.

En eun taol kont oa mouget peb sklêrijenn, netra ken n'oa heñvel ouz kentoh, na liou, na stumm, na sonenn, na frond, na mousc'hoarz. Eur bed dianav oa o trei soudan dirazon ha ne reen forz ebed dioutañ. Riou am-oa beteg e mel va eskern.

Peur e teuo an nevez-amzer endro?
Daoust hag ar goukoug a hell kana a-zioh ar beziou?

Naig Rozmor.

An enezennou

Gand eul labourer-douar euz Lokmize Penn-ar-Béd eo bet savet an diou ganaouenn a vo lennet amañ. Unan anezo a ra e film Iradj Azimi, Les Iles a zo deuet er-mêz e miz meur, hag a oa bet troet e Breiz-Izel. C'hoari er film a ra E. Lunven ivez.

Pa 'n em gav an nevez-amzer
Hag an derveziou braoa deuz a viz ebrel
Ar vizinerien guita an douar braz
Evid mond 'trezeg an enezennou.

Eno 'pad seiz miz
Pell deuz o friejou
Doh ar charreadou ma raint
'Tiskonto an hañvez nevez.

Deuz Ledenez da Vaneg
Toud 'z anavezont anezo
Deuz Kemenez da Valaneg
Chom hini ebed dibiaou deho.

Difonti raint ar mor
Pa deho eur banne gwin
Evid ma veho mad o bloavez
Distinget o hañvez vizin.

Pa ziskenno ar mor
Toud o bagou en em renko
En dizro touez an tarziou mor
Ar hirri a ziskargo anezo.

Gand deveziou heoliet mad
War an tevennou e sehint o bizin
An dra-ze a ray fourniadou mad
Ne vezint ket na ludu na reo.

Diouz an noz en o ziez-douar
Pa en em gavo eur ar zoubenn
O deho plijadur o konta diwar-benn
O deveziou devi.

Pa veho echuet an hañvez
E teuint toud asamblez
Diouz ma veho ar mareou
En eur drehi 'kreiz kalon ar Fromveur.

Diouz ma veho ar mareou
En eur drehi 'kreiz kalon ar fromveur.

Porspoder va bro

Etre Arhantel ha Porspoder
Keroustad zo va harter
Hag e vez brao beva eno
Pezegwir toud an dud gustum kana.

Me zo ganet war an tevennou
Er vintinvez, sul ar bleuniou
Hag em-eus greet va yaouankiz
'Tre Porz ar Roh ha Porz Iliz.

Gwechall eem toud da vizina
Bremañ ar vuhez a zo cheñchet
Ar halz anezo a da da besketa
Hag ar rest da dourista.

An dud yaouank da asamblez
Hag int karget a garantez
Mez a-veh int eureujet
Emaint dija divorset.

Da houde lein deont da bourmen
Deont ket memez da geuneuta
Ha pa reont tro an tevenn
'Deus ket memez ar houraj da beñsea.

Ar merhed a da, da Benn ar Vur,
Da gonta o istoriou
Ha pa vehont ket fur
E klevont o fateriou.

Ar wazed a da d'an aod vraz
Da guzad diouz o merhed
Ha pa da ar haz d'ar raz
Dioustu vehont disklêriet.

Lod a lavar int doh an trede oad
Evid nompaz labourad
Lod all a lavar int labourerien
Pa dint ken nemed chomerien.

E-leh ober o jardinou
E prenont eur maout pe zaou
Hag e kavont digarez
War o meno n'int ket gouest.

En devez gouel ar Chandelour
Oa savet an tour e Gard.
Oa ket bet pell koueza en dour
Goude eur bloavez ha kart.

Eugène Lunven.

O haloupad war henchou Breiz-Izel

Eun enklask war ar brezoneg

IV

Meur a dra all a zo bet c'hoaz o lakaad an aotrou Le Dû da staga gand an Atlas Nevez, da genta ar c'hoant da houzoud beteg pe leh e kendalher c'hoaz da gaozeal brezoneg.

Gwir eo n'eus ket brezoneger ebed ken e departamant al Loar Atlanteg; e Bro-Gwennran hag ar Groazig ez eo eet kuit ar brezoneg eur pennad 'zo. Med, n'eus forz pegen souezuz e hell beza, e chom atao e bro-Dreger, e bro-Leon, e Kerne hag e bro-Wened. E gavoud a reer atao e kement leh ma oa tri-ugent vloaz 'zo, pa oa an aotrou Pierre Leroux oh ober e enklask.

Kleved a reer a-wechou lavared ez eo deuet dezañ kila a-leiz e tu ar zav-heol war-zu ar huz-heol. Ar re a deu an dra-ze ganto n'int ket bet o weled. E kement parrez ma oa bet an aotrou Pierre Leroux e kaver atao meur a hini oh ober implij euz ar brezoneg. Sur eo n'eo ket ken niveruz ken ar vrezonегerien na tost, n'eo ket zoken tost d'ar brezoneg beza ken kreñv en o zouez. Mond a ra goulskoude atao beteg al linenn a ree gwechall an distag etrezañ hag ar galleg; homañ a ziskenn atao euz Sant-Brieg dre Boñdivi beteg Gwened. E gavoud a reer c'hoaz tost d'al linenn-ze, disheñvel a-wechou, gwir eo, ouz an hini a veze kavet eno tri-ugent vloaz 'zo.

Eur skwer kaer on-eus e parrez Mur, e departamant Aodou-an-Hanternoz. Pa oa bet an aotrou Pierre Leroux oh ober e enklask, Mur a oa just war linenn an distag etre ar brezoneg hag ar galleg. War ar poent-ze n'eus deuet cheñchamant ebed. Ar brezoneg a zo atao er barrez.

Med eun dra nevez a zo.

An aotrou Pierre Leroux n'e-noa bet poan ebed o kavoud da respont d'e houlennoù tud ganet er barrez. Pa oan-me bet eno, da viz ebrel 1972, ne oa ket ken heñvel oll an traou. Me n'em-oa ket gelllet zoken kavoud eun den ganet er barrez gouest da gaozeal brezoneg ganen. N'em-oa ket gelllet kavoud nemed eun den koz-kenañ, eun den a zeg vloaz ha pevar-ugent hag e-noa dalhet soñj c'hoaz euz eur ger bennag e-noa klevet gwechall gand e dad ha gand e vamm. Ar re-mañ, kerkent ha ma oe eet d'ar skol, o-doa di-vennet outañ kaozeal brezoneg, beza ma kendalhent o-unan d'henn ober etrezo. Setu ne chome ket ken en e benn bremañ nemed eur ger bennag.

Med taol evez a ranker. An dra-ze ne lavar ket ez eo maro ar brezoneg e parrez Mur. Tud a zo c'hoaz e-barz hag a deu brezoneg ganto bemdez ha brezoneg nemetken evel gwechall. Med n'int ket ken niveruz ha tri-ugent vloaz 'zo. Ouspenn ez int oll tud deuet euz parrezioù all diwar-dro, euz Kle-gereg, euz Laniskad, euz Pluzulian... pe da zerhel tiegez, pe da labourad e-giz micherourien. Ha, beza ma n'int ket ganet er barrez, e kendalhont da zerhel ar brezoneg en e zao, an hini o-deus digaset ganto.

V

An trede tra a glask studia an aotrou Du gand an Atlas Nevez eo ar hemmou a zo etre feson an dud da gomz o yez e pep hini euz peder bro Breiz-Izel: Leon, Treger, Kerne ha Bro-Wened, ha zoken ar hemmou a gaver e meur a blas e peb bro.

Rag e Breiz-Izel (e Bro-Hall ez eo heñvel ivez; en desped da volonteaz ar gouarnamant da lakaad toud an dud da gaozeal heñvel partoud, n'eo ket gouest ha ne vezo ket gouest biken d'henn ober) ez eus bremañ, hag e chom atao, kalz a gemm etre feson an dud da gaozeal e peb korn-bro. Ne ranker ket mond pell evid henn gweled sklêr.

Med n'eus ket da veza estonet. An dud a zo o micher studia ar yezou a oar mad e vez kavet an dra-ze e peb yez a zo. O brasa c'hoant zoken a vez atao kavoud ar hemmou-ze. Ar hemmou-ze a zo evito unan euz an traou hag a verk ar gwella buhez ar yez. Rag eur yez (hag ar brezoneg a zo evel ar re all war ar poent-ze), ne baouez morse da cheñch, tra ma chom beo.

N'ez an ket da ziskouez amañ kement kemm a hellfed kavoud etre peder bro Breiz-Izel. Re a zo hag ar bevr-rasa anezo n'int ket gouest da denna warno nemed evez ar re a zo o micher o studia. Ne gomzin amañ nemed diwar-benn ar re ãsa da weled. Ar henta skwer am-eus kavet e bro Leon. Eno ez eus kemmou a-leiz etre an daou korn-bro, etre Goueled-Leon, bord ar mor, ha Gorre-Leon, 'kreiz an douar. Evel-se, ne vez ket distaget heñvel

ar gerioù e bord ar mor hag e-kreiz an douar. Tud Kastell-Paol, re Rosko, re Zanteg, re Bloueskad hag all... a lavar: **an daol, kear, herrio** pe **hirrio, a yoa, a deuo, dervez, ivez, dezañ** hag all... pa vez lavaret e Gorre-Leon, e Gwiglan, e sant-Tegonneg, e Landivizio, e sizun... hag er parrezioù all tro-war-droioù: **an dôl, kêr, hizio, a oa a deuo (duo), devez, iê, deaã...**

Kemm a vez zoken a-wechou etre ar gerioù. Paotred Goueled-Leon a lar-var: **eur maread, er mare-ze**, pa vez lavaret e Gorre-Leon: **kalz a (pe a-leiz), en amzer-ze**. E Gorre-Leon, Gwiglaniz a lavar: **eur vloh ha saout**, med pa dostaer ouz ar Menez Arre, e Komana, e Sizun, en Dre, e Plouneour-Menez e klever kentoh: **eur vuoh ha buohed**.

E bord ar mor, e Kerlouan, e Brigrogan, e Plouneour-Trêz hag e meur a leh all pred kenta an deiz a vez greet outañ: **lein**; pred kreisteiz **merenn** hag hini peder eur: **gortozenn**. Mad, e-kreiz an douar, e Gwiglan, e Sant-Tegonneg, e Landivizio, e Sizun hag all, ar pred kenta a vez greet outañ **dijuni**, hini kreisteiz **lein**. Eno ne anavezet ket ar ger **gortozenn** ha pred peder eur a zo **merenn**.

An eil skwer a zo roet deom gand an ezezennoù ha koulz lavared toud parrezioù bord ar mor. Eno ez eus gerioù hag a ne anavezet den ebed anezo, gerioù anavezet mad goulskoude gand an oll e parrezioù Gorre-Leon, evel ano anevaled ha re plant a zo. Perag an dra-ze? Abalamour ma n'ez eus ket bet eno biskoaz nag eun aneval nag eur blantenn euz ar seurt-se hag ivez abalamour ma ne veze ket desket ar brezoneg d'ar vugale er skol, rag gouzoud a reer mad partoud ano galleg an aneval pe hini ar blantenn, beza ma ne ouzer ket an ano brezoneg. En enez Sun, en Enez Eusa, e Beg-ar-Havr, e-kichen Morgad, n'eus bet glesker ebed biskoaz hag eno den ebed ne oar nag ar ger **glesker** nag ar ger **ran**, beza ma oar toud an dud ar ger galleg **grenouille**, bet desket er skol. En Enez Eusa n'eus ket bet biskoaz nag eun askell-grohen nag eun heur-eus (anvet ivez e meur a leh an avalouer pe al laer-avalou). Hag eno, den ebed ne anavezet hini ebed euz ar gerioù-ze, beza ma ouzer ar gerioù galleg **chauve-souris** hag **hêrison**.

Lavared a reor marteze goulskoude eh anavezet mad ar ger kistin, beza ma n'eus ket bet biskoaz gwezenn gistin ebed e-barz an ezezennoù. Ya, gwir eo. Med en em gavoud a ree gand tud an ezezennoù, pa deue dezo mond betek an douar-braz, da Gonk-Leon pe da Vrest, digas ganto d'ar gêr kistin prenet eno. Setu eh anavezet ar ger.

Gwelet em-eus ivez, oh ober va enklask, e vez roet a-wechou d'ar memez aneval eun ano disheñvel hervez an traou ma vez hemañ o veva en o zouez. Evel-se, ma veze anavezet peurliesha an anevalig bihan rouz ken kaer o lost, ken brao ha kement a vuhez ennañ, a gaver er hoadou hag er hoadou nemetken, dindan an ano a **gazeg-koad**, e meur a blas e vez roet dezañ eun

ano all. Perag? Abalamour ma vez tennet e ano aliez euz ano ar gwez ma vev-eñ warno ha dre ma ne vez ket ar gwez-se ar memez re partoud, e ano a hell cheñch. E parrez Argol, er hoadou, n'eus nemed gwez-pin. Eno e vez greet outañ ar **haz-pin**. Pell ahano, e parrez Landelo, e veze gwechall muioh a wez-fao eged a wez-pin, hag eno e vez greet outañ ar **haz-fao**.

Meur a skwer a hellfed kavoud evel-se evid diskouez pegen disheñvel e hell beza dre ar vro a-wechou ar gerioù a vez implijet evid envel eun dra. An hini gwella marteze eo hini al loen bihan korneg, gand eun tamm barbig dindan e hroñch, rouez a-walh e Breiz, a gaved gwechall e ti ar paour, diêz da gas el leh ma vez c'hoant abalamour d'ar froudennou souezuz a zav a-wechou en e benn. Soñjal a rafed an aneval-ze n'eus nemed eur ger evid e envel partoud. En em drompla a rafed, rag ma kaver aliez ar ger **gaor (gavr)** da envel anezañ, ez eus e meur a blas gerioù all evitañ. Hervez ar barrez e heller kaoud: **raoh, raor, gawar, bede**.

Evid trei ar ger galleg **goutte**, e kaver peurluisa, e Leon da vihanna, ar ger **berad**, eur berad dour, hag a-wechou **beradenn**. Med e Kerne hag e Treger ez eus gerioù all. E Kerne e klever: **pokad** (Roudoualleg), **tapad, tapadenn** (Landelo), **bokadenn** (Elien), hag e Treger aliez **takenn**.

Pa houlennet digand an dud penaoz e troent e brezoneg ar frazenn halleg: **Il ne sait plus parler breton**, e kaven respontou disheñvel e meur a blas. E Leon hag e Treger (da vihanna etre Montroulez ha Lanuon) e vez lavaret peurluisa: **ne oar ket ken kaozeal brezoneg**. Med kleved a reer ivez en eur barrez bennag e Leon: **hoar ket ken...** hag e Treger: **oar ket kin...** Ar hemm n'eo ket braz. Petra e-neus lakaet anezañ da zond? Diêz eo gouzoud. Marteze eun tamm diegi nemetken, a-walh da lakaad ar ger kenta da vond kuit. E Kerne e vez lavaret: **oar ke kin** pe **oar ke mi**. Eno ne vez ket kleved ken nag ar ger **ne** nag an **t** er ger **ket**. An diegi a zo bet brasoh? Marteze. Med perag eo deut ar gensonenn **h** e Leon en eur barrez bennag dirag ar ger **oar**? Diêz eo gouzoud.

Meur a gemm all a heller kavoud, kalz souezusoh, rag deutet int euz kustumou koz. An hini souezusa, a zoñjan, eo hemañ. Partoud e bro-Leon, war vord ar mor e Treger hag e Kerne, hag ivez e penn pella Bro-Wened, emañ ar hustum da lavared **te** peurluisa d'an dud, dreist-oll d'ar re a anavezet mad. Eno ne vez lavaret **c'hwi** nemed d'an tad ha d'ar vamm (red eo goulskoude anzav emañ bremañ ar hiz-se o vond da fall; lavaret e vez **te** ivez d'ar remañ eur pennad 'zo), d'an aotrou m'êr, d'an aotrou person, d'ar medisîn, d'an noter, da lavared eo da gement hini e vez c'hoant merka eun tamm resped.

Med endro da Geraez, el lodenn vrasa euz Kerne hag en eul lodenn vad euz Bro-Wened, ne vez ket biskoaz lavaret **te** da zen ebed. Ne anavezet ket zoken ar ger. Eno e vez lavaret **c'hwi** atao d'an oll. Eur poatr yaouank a lavar **c'hwi** (pe aliesoh **fi**) d'e gamaraded: **C'hwi a zo eur paotr mad!**

En em gavet eo bet ganen meur a wech goulenn digand tud Kerne: « Te pe C'hwi a lavarit d'an hini a houlennit eun dra digantañ? Te po eur banne gwin? pe « C'hwi po eur banne gwin? » Beb tro e welen ne veze ket komprenet va goulenn. Perag?? N'eo ket abalamour ma veze pounnerroh pe hourtoh spered tud Kerne eged hini tud Leon ha re Dreger, med abalamour ma ne 'deze biskoaz kleved den ebed endro dezo o lavared **te** d'eun all. Ne oa ket bet desket ar ger-ze dezo, biskoaz.

War boent ar hemmou, em-eus kavet eun dra all oh ober va enklask: an traou a verk mad spered an den hag a chom ennañ atao, a ouez mad atao, eo ar re a gav en e labour, en e vicher, pe bemdez endro dezañ. Ar re-ze ne deu ket dezañ ankounac'haad o ano.

Med rouez e vez ar re hag a anavez ano an traou a gav ar re all en o micher pe endro dezo. Eul labourer-douar, peurluisa, ne anavez ket ger ebed euz micher eur pesketaer, nag ano e ostilloù hag hini ar pesked a denn euz ar mor. Ar pesketaer n'eo ket gweloh. Peurluisa ne anavez ger ebed diwar-benn an tiegez pe diwar-benn al labour-douar. Hini ebed euz ar besketaerien am-eus bet da gaozeal ganto oh ober va enklask nag e Morgad nag e Kameled nag e Douarnenez n'e-neus gelllet rei din ano unan euz an traou a gaver e tiegez eul labourer-douar.

Y. Miossec.

Pierre Trepos

Le pluriel breton

30 lur (400g)

REDADEG KILLOG

Diwar Ar Marh Reiz
(eñvorennoù yaouankiz)

Eur pezh a bevar real e-noa ar Bi roet dezañ, hag eur banne mad paeet e ti ar C'hotour da vond da eva pa garfe.

Ar C'hordenner koz a oa « chasse-gueux » en iliz hag inkanter war ar blasenn. Lan ar C'hordenner a veze greet anezañ.

War-lerh peb overn e save evel-se war voger ar vered koz, hag e kroge atao gand ar memez rimadell:

—« Selaouit mad hag e klevoh gwell a-ze!...»

Gand eur vouez da zihuna ar re varo e-noa bet greet eur wech dija ar halvadenn-ze.

A-néz ar banne da eva e ti ar C'hotour, hag ar pezh a bevar real, n'e-nije ket bet gortozet... C'hoant e-noa e klevfe an oll hag e vefe kontant ar Bi.

Edo-eñ, aze just, e traoñ ar voger, e fri gantañ er vann dindan e dog peizant voulouzennet.

—« Selaouit mad hag e klevoh gwell a ze!...» emezañ evid an eil gwech.

Dirazañ, ar wazed, leiz an hent anezo, a baoueze da gaozeal, an eil goude egile.

Ar re a oa oh eva e ti an Argoualh a gabalas da lonka o banneou kognak. Ar merhed zokén, hag a gustume chaogad heb fin war blasenn ar vered, dirag lost an iliz, a roas peoh.

Ne veze klevet kén, nemed an Dimezell Mari, o vond euz eun toulad merhed d'eun all da ginnig « Feiz ha Breiz » an Aotrou Perrot.

Eur gazelliad a oa ganti. Me ivez a brenas unan. C'hweh kwennege e kouste.

—« Selaouit mad hag e klevoh gwell a ze!...»

Harpa 'reas c'hoaz eur pennadig, amzer d'ar Gwenn koz da lavared da Yann Riou e plég e skouarn:

—« Teir gwech! Aze 'z eus eur banne mad da gaoud!»

—« Ya, eme Yann, hag ouspenn dég kwennege gwerz-butun, pario!»

Ar « gard-champetr », e prenestr digor solier an ti-kêr, dirag e daboulin, a hortoze, inouet.

Bremañ, pa wele edo an oll zellou, a-bañ, o selled outañ, e kendalhas Lan:

—...« Goude ar gousperou e vezo c'hoari-gillou en Ogellou. Eno 'z eus plijadur da gaoud: pemp pakad butun-fumi, tri bakad butun-chik, litrajou gwin-gwenn ha gwin ruz, daou vouchouer-fri, eur gouriz glaz hag eun tok voulouzennet a zo da hounid war ar hillou, ha redadeg ar hillou evid echui. Ar Bi a béd ahanoh toud da vond d'an Ogellou, goude ar gousperou. N'ho-po ket a geuz, kredit ahanon!»

Goustadig e tiskennas Lan diwar e voger. N'oa ket re zivorfil kén e zivesker.

Ar Bi e-noa greet outañ, a-raog, eur zell a gontantamant a lakeas lorch ennañ.

*
**

An dud a grogas endro da jaogad. Ar baotred yaouank a oa krog dija da baria hag a hoarze kreñv.

E ti an Argoualh, ouz ar hontouer, e oa adarre leun a dud. Ar zal a-dreñv a oa leun a verhed o kafea. Neket eno eo e oa an nebeuta a drouz.

Ar « gard-champetr » a oa kroget da skei war e daboulin a daoliou ingal ha pounner.

Deuet e oa dija ar wazed niveruz dirag ar prenest, ma oa karget ganto a-béz an hent-praz. Riskl e-béd neuze, da veza direnket gand ar hirri-dre-dan.

Pa gavas dezañ e oa a-walh a dud dirag an ti-kêr, an tabouliner a roas e blas da Baol Herri ar zekretour braz.

Dond a reas gand eun dornad paperiou, re vraz ha re vihan hag ivez re a beb seurt liou, a vefe staget goude, gand yod, ouz moger an ti-kêr.

Ar zekretour braz n'e-nije biken roet ar garg-se d'eun all. Eno eh en em gave uheloh zokén eged ar Mêr: evel eur roue o rei e lezennou d'e zujidi, evel Moizez war ar Menez gand taolennou al Lezenn.

Hag e grogas evel-henn:

—« A-berz an Aotrou Mear, em-eus da gemenn deoh e vo vaksinet ar vugale vihan diziou goude lein. Arabad beza re ziwezad.

An Aotrou Mear ne vo ket er gear dimeurz na dimerher.

Eur baskul a hiz-nevez a zo deuet d'an ti-kear. Ar mammou a garo a hello bremañ dond da boueza o re vihan pa blijo ganto. Ne gousto netra.

An Aotrou Lirzin, noter, a werzo dre adjidikasion, dimerher, goude lein, eun tiegez e Kreac'h-Piged. Bez' ez eus da werza: eun ti stag outañ eur marchosi toet e mein-sklent, eur hraou-zaout toet e soul, eur harr-di toet e balan gand klud ar yêr ha kreier lapined e penn...»

Eur hoarzadeg trumm a drohas ar gaoz-se da Baol Herri. Sin a reas da jom peoh hag e stagas endro:

—« Ouz an atant ez eus pemp devez-arad douar-labour, diou foenneg

a zeiz mil fas pep hini hag eur waremm veineg.

Gwerzet e vo da heul, eur vloh leun, diou vloh nevezal, daou leue bihan, eur wiz koz gand he zorrad moh-bihan, eur marh-antier ha binviachou a beb seurt...

An atant, gand he lojamant, a zo lakeat e priz 300.000 lur.»

« Saig ar hantonier e-neus torret e harr. Ar re a dlie mond, er zizun-mañ, d'ober aner gantañ, a zo pedet da hortoz.

« Hanter-kant skoed a zo bet votet da brena eun habid nevez d'ar « gard-champetr ».

Dremm ar « gard-champetr » a-dreñv kein ar zekretour a fraillas gand al laouenidigez. Korda 'reas e voustachou hir. An dud a oe klevet o c'hoarzin.

Paol Herri a gendalhas:

« Disul e tigor ar chase. Ar « permis » a hello c'hoaz beza roet er zizun-mañ. An Aotrou Mear a zigas da zoñj eo difennet mond da jaseal er Hoad-pin. Ar re a yelo a bako eur « goñtravañsion ».

Eur pez grozmoz a zavas amañ hag a-hont. Pa baouezas ar zoroh, e klozas ar zekretour e gaoz evel-henn:

« Paol an Ode-Galed a ro deoh da houzoud e-neus prenet eun taro nevez...»

Hag a-greiz ma tirolle an dud e strinkas kreñv, eun eur zerri ar prenest:

—« Eun taro a ouenn vad!»

*

**

Ar Bi e-noa kempennet brao e vali gillou. Hir e oa, med heb beza re hir, rond he hein, heb beza re rond.

Ar harziad spem war ar hleuz a rofe disheol d'ar hoarierien. Laket e-noa evito dindan ar harz eur plankenn, dezo da helloud azeza.

An nao gill a oa dija en o zav war an tri blankennig a-zioh toull ar zaver.

Killou 'oant, a zoñje ar Bi, hag a vefe diouz goud an oll: killou postet mad war o hillorou da harpa ouz an avel.

Eur c'hoarier mad a helle pilad nao gill, gand ma lakafe ar voul goad da vond just etre diou renkad. An teir voull greiz a helle neuze kosteza braoig ha tumpa an teir all. Evid ober kemend-all a-vad eo réd beza eur maout.

Eur wern uhel, gand eur ruill ouz he bég a oa ar prizioù outi a-zis-tribill, a-dreñv an toull-killou. An oll a helle o gweled o fichal ken brao en avel.

En eur vond d'an overn ha d'ar gousperou, kalz o-doa dija glaourennet outo.

—« Gand kemend-all a brizioù, sur eo e vo tud!» a lavarent an eil d'egile.

Hag ar Bi a oa ennañ eur pezh lorch.

*
**

Tud a vo sur!...

Paotred an overn-vintin a oa erruet da genta. Edont krog da ober taolioù esa p'edo ar hleier o sini evid eur vadeziant.

—« Paotr bihan Chanig a Leslann,» eme an Higenn en eur ruill ar voul.

—« Echu ar gousperou,» eme ar Bi. Hag e kave dezañ e sone ar hleier evid digeri ar jeu.

*
**

Euz an daou benn d'ar straed e teue an dud a-vandennou, gwazed ha paotred yaouank.

Merhed gand o bugale a zeue ivez, da zelled, gand o hoefou chikodenn hag o jaliou troñset war o diskoaz.

Bi e-noa laket evito, en tu all d'an hent, skabellou ha piltosou.

Aze edo dija Monig, Filo, Annaig ha Soaz, Sinig ha Mên, ha meur a hini all.

—« Me 'garfe, eme Zinig, en eur zelled ouz bég ar wern, e hounezfe Nanig an daou vouchouer-ze.»

—« Evidon-me, eme Vonig, a garfe gwelloc'h e hounezfe Cheun ar gouriz glaz. Hennez a zo tomm, ha Cheun a grog ennañ ar boan gov gand an disterra yenienn.»

Ar re all a hoarzas ouz he hleved.

*
**

Pa gavas e oa tud a-walh, ar Bi a roas ar voul da Jañ-Mar en eur lavared:

—« Beh d'ar jeu! Pevar real an taol.»

Dég, d'an nebeuta a daolas pevar real en toull killou. Bi o dastumas en eur skudell goad, en eur horn d'an toull.

Ar wazed a zavas en o zav hag a stouas en daou du d'ar vali, da wled gwelloc'h.

Dég c'hoarier! An dra-ze a lake dég lur en taol kenta. N'oa ket re fall evid digeri!

E-keid ha m'edo Jañ-Mar oh esa e voul, en eur lakad anezi da zañsal ha da drei war balv e zorn dehou, da glask an tu mad, e kouezas c'hweh pezh all er skudell.

Jañ-Mar, a-du gand Bi, a gemere e amzer da hortoz ma teufe re all c'hoaz.

—« An teir gill gleiz n'emañ ket eün », emezañ.

Ar Bi o renkas eün.

Daou bez all a nijas dreist ar pennou. Triweh c'hoarier!!!

Eur voutailad gwin gwenn a oe laket war ar hoariadenn genta. O weled al litrad, meur a hini a zantas e oa seh riboul o hornailenn.

—« Ma vefe kouignou da hounid, me 'gernerfe ivez ar voul », eme Vonig.

—« Ya, kredabl, genaouégéz! eme Filo, ar wazed a gav gweloh gwin. »

Jañ-Mar ne oa fin e-béd dezañ da esa e voul. Lod a hrozmoles. Ar Bi a reas neuze outañ eur wilhadenn.

Kerkent, Jañ-Mar a blegas e hlin dehou beteg an douar hag a lakas bég e votez kleiz en toullig dirazañ. Bralla 'reas e vreh, hag ar voul a ruillas, herr warni. Mond a reas a-benn war ar renkad kleiz. Teir gillenn a ruillas en toull da heul ar voul, en eur sklakal seh.

Dén ne lavaras netra... Jañ-Mar a hejas e benn diskontant:

—« Dichañs! » emezañ.

En eur zevel ar hillou, ar Bi a youhas:

—« An hini a raio « kazeg » a roio dég kwennek beb tro d'ar zaver, ha dég kwennek all da lakaad er jeu.

Nanig, war-lerh, a glaskas stropa. « Kazeg » a reas. Eur hoaradenn a dregernas.

Sinig a ruzias gand ar véz. Annaig a hoarzas dezi, pa welas Nan imoret fall, o tenna daou bez a zég kwennek euz e hodell, hag ouz o stlapa d'ar Bi gand fae.

Ar Bi a roas dezañ ar voul endro. Mond a reas war-eün, en taol-mañ. Peder gill a gouezas.

A-benn fin ar c'hoari, gand an taoliou « kazeg » e oa ouspenn pemp tur warn-ugent er jeu.

Gand Mig eo ez eas an taol kenta. Goulenn a reas diou pe deir gwe-

renn; ne badas ket pell al litrad etre e zaoarn.

*

**

Pevar ha pemp taol a zeuas evel-se, buan a-walh, an eil war-lerh egile.

—« En dro-mañ a-vad, e vo muioh a grog, eme Vaodez. Butun ha gwin a zo mad. Med eun tok voulouzenet a zo gweloh c'hoaz: brasoh e dalvoudegez.

—« Ahanta! beh neuze! Da biou an tok? » eme ar Bi en eur zevel ar hillou evid eun abadenn all.

Buhez ha cholori a oa, forz pegement, endro d'ar vali-gillou. Ar merhed hepkén a jome sioulig a-walh en o horn. Ar vugale a fistoule, darbaret muioh gand o hoariou o-unan.

Ar Bi, en e doull-killou, a boanie da gonta arhant ar skudell, a-raog an taol braz gortozet gand an oll.

Ne veze ket a-walh dezañ arhant an taoliou « kazeg ». Ar hiz a oa da gemer eur gwenneg bennag diwar peb abadenn. Ar priziou, e bég ar wern, n'oant ket bet roet evid netra.

Ya, en taol-mañ e vefe tomm d'ar hoarierien. Ouspenn tregont a oa war ar renk.

Bremañ e oa anavezet mad ar hoarierien wella. Ar pariadennou diwar-benno a yee brao endro.

N'oa ket gwall êz ober nao! Evid-se e oa réd stropa ouz an tu kleiz da lakaad ar voul da ziskenn a gorn ha da skuba an nao gill.

Bez' e helled ivez mond war-eün, méd atao e veze eur hrouanenn hroz bennag da ziborzia ar voul. Hag e save neuze eur pezh kamaj war ar Bi.

—« Re hroz da ale, Bi. Réd e vo dit, a-benn ar wech all, lakad warni trêz aot... Me 'zigaso dit eur harrad ma karez. »

—« Karr ha loan am-eus, » eme ar Bi, feuket eun tamm.

*

**

Edo bremañ tro ar Born da zigeri an abadenn. Ar brud e-noa da veza eur gwall hoarier.

—« Ugent real ouz an neb a garo e kouezin eiz kill », emezañ.

Eiz kill!... Dén e-béd beteg neuze n'e-noa bet kouezet eiz kill!

An oll zellou a droas ouz Yon, a veze atao imoret a-eneb ar Born. Ar merhed end-eün, a zavas diwar o skabellou, hag ar vugale, o-unan, o-doa paouezet da fistoulad.

—« Paria `raio », eme lod.
—« Ne raio ket! » eme lod all.
Erfin e lavaras:
—« Ugent real ne ri ket eiz! »

Hag e strinkas eur pez a ugent real war an ale. Ar Born a reas kemend-all... An oll a zalhe war o alan.

Mond ha dond a ree ar Born, trei ha distrei, eun taol troad amañ da strinka kuit eur hrouanenn diwar hent ar voul, eun taolig seul aze da blada eur bouloudennig zouar... Ne veze morse plasat mad a-walh ar hillou evitañ, kaer e-noa ar Bi poania ha poania ganto.

Petra `raio?... Stropa pe mond war-eün?... Mond a raio war-eün.

Ar voul a ruille braoig. Edo o vond da borzia mad, ha dija an dud a estlamme. Biskoaz ne oa bet gwelet boul o ruill ken eün!... N'eo ket eiz kill eo a gouezo, med nao, skubet brao ha kempenn.

—« Tri mil gurun! » a youhas ar Born.

Eur hoz tamm greunennig vein, en em gavas, d'ar poent diweza, d'he distrei eun tammig diwar he hent. Ne gouezas nemed seiz kill!!!

Yon a youhas gand al lorth en eur lopa war e vorzedou gand palv e zaou zorn. Annaig a oa ken laouen hag eñ. Bél a-vad, a zelle outi a-dreuz.

Ar Born, kouezet e glipenn war e glapenn a jome mud evel eur pesk. Yon a zastumas peziou ar bariadenn. Koulskoude e hrougnas ar Born etre e zent:

—« Kea `tao, va faotr! Neket te eo ez-pije greet seiz! »
—« Ken gouest ha te bemdez! paotr teo! », eme ar Born gwall-flemmet.
—« Ugent real all, sell! ne ri ket seiz! »
—« Ugent real e rin, » eme egile en eur zével war e ellou, evel eur hillog lorthuz.

Ha daou bez ugent real da nijal adarre.

Mad, neket seiz eo a deuas gand Yon, med eiz! hag an tok voulouzenet war ar marhad.

—« Eur maout! Ya, eur maout!... » Ar Born gand e imor a vennas mond da zod.

—« Lez da vond, kanfart, m'henn talvezo dit, bez dineh. »

*

**

Maodez a zigasas ar hillog: eur hillog braz, brao, maget mad, kreñv ha lijer... hag eur gwall hini.

Sevel a reas gantañ war ar hleuz evid ma welje mad pep hini. Ruz e gribell, ar paour-kêz loen, en eur zifreta e ziuaskell a en em houlenne petra `hoarveze gantañ. Perag an trouz-se gand ar wazed? Daoust ha kollet eo ganto o fenn? Perag ema ar merhed o wihal evel eun torrad moh bihan? Hag ar vugale, perag kement a durlut ganto?

—« Peoh! eme ar Bi. Peoh! »

A-nebeudou e tavas ar jolori.

—« Bremañ, redadeg ar hillog! Pevar real ivez an taol. » Hag e reas an dro gand e skudell en eur gonta mad ar rederien.

Nanig e-noa mil hoant da redeg. Med n'e-noa mui gwenneg e-béd. Sinig hag he-doa « choa » outañ a riklas dezañ pevar real en e hodell.

Ar Bi e-noa bremañ daou lur ha tregont en e skudell: daou reder ha tregont eta!

*
**

Ar rederien en em gavas diarhen, war gorr o rochedou, en eur renkad war leurajenn ar park hir, dirag ar foenneier.

Tregont paz izelloh, e-kreiz ar zoul, ar Bi a strinkas ar hillog er vann, war-zu an traoñ d'ar park hag e lezas eun tenn d'e sponta ha da rei loh d'ar rederien.

Trible-nonde! m'ho-pije gwelet! Pebez kabal a zavas neuze! Ar hillog, pennfollet, a dehe war-zu ar foenneier evel eun diaoul krog an tan en e lost.

Ar wazed a rede evel ma vije krog an tan en o skasou.

War ar hleuz, ar re all a hope, a youhe, a vleje, a strake o daouarn.

Ar merhed a guze o fenn en o zavañcherou en eur grial forz.

Ar vugale a lamme evel leuiou bihan dinasket.

En eun nijadenn edo ar hillog e-kreiz ar foenneg braz. Eno e reas eun harp da zelled endro dezañ.

Ar rederien a oa war an tu dehou. Mond a reas ar hillog war an tu kleiz a daoliou treid hag a daoliou diouaskell. Tostaad a ree outañ ar re lijerra.

Ar yér, e-kreiz al leur, a oa kemend a garnach ganto hag ar merhed... Ar hi a harze, en eur lammad war e doull. Ar hilleien all a yude...

Egile a dehe atao, war-zu ar bouillennou, ar poullou dour, al lehid hag al lagenn.

Ar rederien ivez, a ree gaol, ha ne welent na goueriu, na poullou, na lehid, na lagenn.

Koueza 'reont en dour-gwern, lammad a reont e-kreiz al lagenn, strinka 'ree al lehid dreisto, plada 'reont ar raoskl hag ar cheked lemm, frigasa ar beler glaz, diskolpa ar bodou haleg-gouez.

Va Doue! pebez reuz!

Ar hillog paour, laket dall, a nije hag a dehe atao. Treuzet e-noa ar bouillennou. Edo bremañ e Gwaremmou-ar-moued, e-touez al lann hag an dréz.

*
**

Ar Born a oa lijer ha nerzuz. Yon her have atao dirazañ, war e hent, etre e dreid. Diou wech dija e-noa e strobet, en eur lammad dreist ar hleuz hag en eur dreuzi eur poullad bouillenn.

E laket e-neus da goueza e-mesk ar cheked lemm, tostig d'eun toull-kurun, hag e-keid-se e-noa kemeret lañs warnañ.

Edo c'hoaz ar re all o vresa pri er bouillennou p'edo ar Born er penn a-raog, o tiskrapa e-touez al lann.

Ar hillog a oa en o zouez ha ne veze mui gwelet.

-« Kavet e vo! ha neket te eo a lako warnañ da grabanou, » eme ar Born da Yon, tostig dezañ, war e zeuliu.

Klevet e vezent o tialanad, re bar da vegin Saig ar gov.

Ar hillog a zifoupas neuze euz kreiz eur vodenn zrêz... ha da vond a-héd eur hleuziad piltosou dero koz, penn-da-benn gand ar hleuz.

Ploup!... Eun taol diouaskell!... Hag ar hillog war-horre eur piltos uhel, leun a ilio, ha d'en em fourra en eun toull kaouenn, er héf teo ha kleuz.

Yon eo a zo bremañ er penn a-raog. Nanig, Reunan ha Cheun en e gichenn. Gwelet mad e-neus ar hillog o nijal ouz ar pilgos.

—« E peleh 'ta ema ar Born?» eme Yon. « N'e-neus nemed tostaad m'e-neus c'hoant dond a vorn da zall.»

Ar Born n'edo ket pell. N'oa, evid c'hoaz, na born na dall, na bouzar... ha ne vezo ket.

War e barlochau, dre zindan al lann hag ar balan, e-noa trohet berr... Difoupa 'reas e-harz ar piltos koz, krabiset oll e zaouarn hag e zivesker. An dra-ze a-vad, ne ree dezañ netra. Re entanet, ha re imoret e oa evid santoud eun dra bennag.

Kerkent ha Yon edo ouz korv teo ar piltos oh en em ziskrapa e-touez an ilio. Diskolpa 'ra ar skourrou. Pignad ha rikla 'reont o-daou, beb eil tro.

Paket ganto eur memez skourr kaled, e stagont d'en em ganna, an eil o klask diskar egile. Pep hini a zalh mord: bodou torret ha dillad diframmet hepkén.

Ar hillog a zo aze, en toull kleuz. Ar Born e-neus gwelet e gribell dindan an ilio... Paka pég a ra ennañ... Ar hillog a yud...

Ema dezañ!!!

Nann! Yon a grog ivez... en e lost. Youhal a ra:

—« Din eo !»

—« N'eo ket!» eme ar Born.

Eur frapad krenn!

Eun dornad plu kaer, ruz, melen ha du a jom gand Yon en e zorn: lost ar hillog!

Ar Born a ziruil diouz ar piltos, ar hillog, hanter vahagnet gantañ en e vruched.

*

**

An hini ne bade ket gand al lorch, en abardaez-se en eur vond d'ar gêr, piou e vefe, nemed Belig a Lezlann, karedig Saig ar Born.

V. Seite.

Eñvorennoù-pobl.

Bleizig va zad-koz

E fin ar hantved tremenet e oa c'hoaz bleizi e Menez Are.

Va zad-koz, kostez va mamm, Doue o fardono, a oa ginidig euz Plouneour-Menez. Va zad-koz a oa bet ganet e Plouzeniel.

Eun dervez, e oa eet tad-koz da glask to d'ar menez. Gand balan e veze toet ar hreier. Red e veze o hennenn aliez; freuzet e vezent, aliez ivez, gand an aveliou a hwez heb ehan war lein Menez Are.

Setu 'ta va zad-koz d'ar menez. E falz vihan gantañ war e vreh, e fuzul-chaseour war e skoaz, e gorn-butun e godell e justin.

Bale seder a ra gand e voutou Landivicho, eun dorchenn ler warno.

Echu gantañ e veh balan, tad-koz a gemer amzer da ober eun tamm diskuiza, er goudor, e gein harpet ouz ar hleuz. Amzer ivez da gorn-butunad. Mousc'hoarzin a ra en eur selled ouz ar moged o sevel diwar e gorn-butun en eur rodellad.

*

**

A-greiz peb kreiz, e kav dezañ ez eus aze a-dreñv e gein unan bennag o tenna e alan, ha berr warnañ.

Trei a ra e benn, ha petra 'wel? Aze, war ar hleuz, en he zav war he faoiou a-dreñv, eur pezh bleizez o vond da zailla warnañ. He daoulagad a zo evel daou gef-tan, digor-braz eo ganti he genou gand he skilfou gwenn-kann, hir ha lemm. Eur spont!

Tad-koz ne ro ket amzer dezi da lammad gantañ. Kroget eo en e fuzul hag, a-nerz e gorv, dao d'al loan gouez gand pal ar fust. Strakal a ra pao ar vleizez en eur derri. Eur yudadenn skiltruz a laka Menez Are da dregerni, gand an hekleo o terri e benn ouz an eil garreg d'eben.

En eur jilgammad e sach ar vleizez he skasou ganti, he fao a-raog evel eur freill a-istribill ouz he bruched.

*
**

Pa zell tad-koz a-dreñv ar hleuz e wel pevar bleizig bihan o tiskrapa e-touez ar brug, al lann hag ar raden, o klask mond da heul o mamm. Gelloud a ra lakaad e graban war unan anezo. Pebez loenig koant!

Ha d'ar gêr bremañ. Ar beh balan war e gein, ar bleizig bihan en e durban. Tad-koz a zo gwisket e justinog hag evel an oll justineien e vez gantañ eun turban. Eun turban giz Bro-Skos, gwiadet e gwenn, du ha glaz.

— « Koan d'ar bleiz! » eme tad-koz o tond en ti.

Eur skudellad yod-kerh trempet el lêz dous ha setu prest koan ar bleizig. Ne chom ket da ober ar figuz dirag e skudell. Lonket eo trumm ar skudellad yod-kerh, lipet ar skudell ha lipet ar mourrou.

Ha da gousked bremañ.

*
**

Nevez gwerzet eo ar pemoh. Goullo eo e graou. Setu kraouiet ar bleizig ha serret mad an nor warnañ.

Buan e teu al loenig da veza doñv. Lezel a heller digor an nor warnañ. Mond ha dond a ra dre al liorz hag al leur. Gwelet e vez o hoari lamm-chouk-e-benn e penn ar bern kolo. Ar vugale a hoari gantañ evel gand eur hi bihan. Med pa wel tad-koz o vond d'ar park ne chom ket da hoari; dioustu e red d'e heul.

*
**

Eun amezeg deom ne ehan ket da derri e benn da dad-koz o hou-lenn digantañ presta dezañ ar bleizig. C'hoant en-deus mond gantañ da foar Vontroulez da ziskouez anezañ d'an dud.

Asanti a ra tad-koz, a-benn ar fin, en eur hina.

En eur hina ivez e ya ar bleizig gand amezeg e vestr beteg Montroulez:

Paour-kêz bleizig!

Lostog ha mezuz eo aze oh ober e furlukin war ar blasenn dirag ar bern tud a zeu da henaoui outañ. Lammad a rafe outo ma ne vefe ket chadennet. Mez en-deus leun e gov ha ne zreb tamm ebed. Mouzet eo ouz e voued. Mouzet eo ouz an dud.

Skuiz-maro eo pa zigouez er gêr.

Joa a ra d'e vestr koulskoude.

*
**

A zeiz da zeiz e teu ar bleizig da veza bleiz. Tud 'zo, er gêriadenn, hag o-deus aon na deufe da veza droug en eur greski, beteg, marteze, kregi er vugale.

*
**

Eun abardaez-noz, va zad-koz, skuiz o kleved rebechou an amezien, a lez dor ar hraou dígor-braz war ar bleiz. D'ar mintin, e oa eet kuit al loenig, da glask e vreudeur ha da veza ganto er menez.

*
**

Daoust ha gouzañvet eo bet ganto? Den ne oar.

War a gonter, al loened gouez a vez bet o veva e-touez an dud ne vezont ket gouzañvet ken gand al loened gouez all. Ar pezh a zo sur eo, ne zistroas ket ar bleiz d'e graou.

Yvonne Cochard.

Loeiz Roparz

Brezoneg 'n eur gana

– En ti bihan lein ar menez; kan ar hejer; Son ar c'hwenn; Pa oan o sevel lein ar roz; Biskoaz 'm-oa c'hoarzet kemend-all; Tond d'ar gêr euz a Rostren; Al laouenanig; Ev chistr 'ta, Laou; Kabiten St-Malo; Bannielou Lambaol; Ar hoz paotr-yaouank-koz; Metig.

Eul leorig: 7 lur (50g)
Eur vinikasedenn: 40 lur (100g)

Eur vedalenn ikiz

–« Hola, Lommig! Pres 'zo warnout, 'vid ar beure.

–« Gouel ar Republik, Jakez!

–« Gouel ar Republik?... med n'eus mann 'bed er bourk, 'vid ar bloaz! Ze oa mad gwechall goz, pa oam yaouank... Med bremañ, Lommig, den 'bed e Kerlankon ne bled gand an traou-ze. On farrez 'zo diboblet... Ar re yaouank a zo eet kuit... Ar goñseillerien a zo re goz...

–« Setu-te krog da gana gousperou an anaon, Jakez. Anad eo ne zeuez ket alfez d'ar vro... E Kerlankon, e zo c'hoaz kanfarded hag a oar diverrad oh amzer hag ober an traou 'vel m'eo dleet. Ha 'vid ar bloaz e vo kaerroh c'hoaz an traou...

–« Ar cheñchamant, Lommig?

–« Chilaou 'ta. paotr, n'on-oa ket gortozet an degved a viz mae 'vid lida gouel ar Republik. An Ao. Mêr hag a oa eur penn-braz 'barz an arme-vor, e-neus plijet ordin dezañ ober eun tamm tralala 'vid ar goueliou, ha dreist-oll pa vez kision da vond d'ar monumant. Ale, hast buan dond ganin. Plijadur 'vo, laran dit!

Ha setu penaoz eh is, deiz gouel ar Republik, e Bloavez ar cheñchamant, gand va mignon Lommig Traon-ar-Hoad, da gemer perz 'barz al lidou prepartet gand kuzul an ti-kêr ha prezidant strollad « Zoudarded koz Kerlankon. »

War blasenn ar bourk, eun deg bennag a dud a oa dija bodet dirag dor ar mêrdi, o hortoz an defile da vond d'ar monumant, zavet e-kichen toull ar vered.

E oant aze, va hamaraded-skol, martoloded war o leve an darnvuiañ dioute, distroet d'ar vro goude beza bet hej-dihej war moriou ar bêd.

—« Salud, Jakez, penaoz 'mañ kont ganit? Deut out d'ober eun tamm-tro d'ar vro? Ma fe, 'teus ket cheñchet... Ar memez hini bepred...

—« 'Zoñj ganit, Oanig! Ha koulskoude e ran 'vel lost ar zaout: mond war-draoñ, paotr-koz. Pesort 'fell dit, n'haller ket bezañ ha bezañ bet...

—« N'eo ket ar momed d'ober gwad fall, Jakez. Hidiv, ema Gouel ar Republik!

Chomet e vijem bet aze da gomz diouz troiou-kamm on bugaleaj ma ne vije ket bet arruet an Aotrou Mêr da reiñ e urziou 'vid an defile.

—« Unneg eur! Poent eo dim mond beteg ar monumant. Zantig, tap an drapo.

Zantig, eur micherour war e leve, bet greet gantañ brezel an Aljeria, a dapas an drapo hag en em blasas e penn an defile, fier 'vel eur pabor. 'N e gichenn, Gab o hweha 'n e gleron. Eur hleroner dispar, va hamarad Gab, barreg daoust d'e noad, da zon n'eus forz peseurt ton, kenkoulz ha gwechall pa oa e kazarn an « depo » e Kêr-Vrest. 'Dreñv deze, sekretour ar mêrdi o tougen eur boked bleuniou gwenn, glaz ha ruz, an Ao. Mêr gand e zeizenn triliv endro d'e gov rond; ha nim oll d'ar paz 'trezeg ar monumant. Tri pe bevar koñseiller nemetken a heuille an defile, ar retireted... Rag Yann Gouer, e Kerlan-kon, daoust dezañ da vezañ koñseiller 'nevez ket amzer da goll pa splann heol miz gouere. Ha splannaad a ree, an deiz-se, kredit 'hanon.

Arru e toull ar vered, an Ao. Mêr a gemeras ar fleur digand ar sekretour hag a gerzas 'n e-unan 'trezeg ar monumant da boza aneze war ar bazenn izella. Daou baz a-souz-dreñv hag e plegas e benn moal da zaludi ar mên-eñvor.

—« Ar galv!» emezañ.

Gab a stagas e gleron ouz e vuzellou hag a hwehas ennañ ken kreñv ken e ruzias e glupenn 'vel hini eur hog o tistaga e gotogogog. Zantig, d'e dro, a zaludas gand an triliv.

—« Mersi deoh, eme an Ao. Mêr. Distroom buan d'ar mêrdi.

E oa dija o vond kuit, pa dostaas dioutañ gwreg prezidant ar strollad. A vouez izel, kazi ouz en grena, gand aon he-doa da feuka anezañ, e laras:

—« Aotrou Mêr, ar medalennou...

—« Ar medalennou, Mai? Med dirag an ti-kêr, war ar blasenn...

Hag heñ da zerhel gand e hent. Ha nim oll da heuill anezañ, Zantig gand an drapo, Gab gand e gleron dindan e vreh.

—« Mud eo da gleron, Lommig! Trist eo an traou! Lar da Gab zon eun dra bennag... n'om ket deut d'interi ar Republik, geo?

—« Red vefe goul' gand an Ao. Mêr, da genta, Jakez!

—« Hag ar cheñchamant, Lommig? Hidiv eo gouel Republik ar cheñchamant, non-de-distag! Pep hini a zo bremañ lib d'ober pezh a gar. Ale, Gab, eun taol kleron, ma plij.

Ha nim da huchal:

—« Gab, c'hweh 'barz, krohenn ma inel... N'out ket poatriner, geo? N'eo ket eet an arme-vor da fout?... 'Vid ar bloaveziad, non-de-die!

Imposubl dezañ nah... Ar hleron a dregernas dreist d'ar vered beteg traonienn Zant Jeg ha nim oll adarre d'ar paz beteg plasenn ar bourk.

—« Ha bremañ, 'me an Ao. Mêr, eh an da gaoud ar blijadur da vedalenni pemp « stourmer koz » diouz ar barrouz.

Ar pemp stourmer 'n em renkas dirag dor an ti-kêr: Nestig, Lukaz, Batist ha Job, bet o vrezelia ti ar Vorianed, en Aljeria, ha Jañ-Mai, pemp ploaz ha pevar-ugent dezañ, greet gantañ ar brezel braz, an hini pevarzeg 'vel just.

Ar hleron a dregernas, an triliv a zaludas.

Mai, gwreg ar prezidant, a roas eur vedalenn d'ar mêr.

—« Hini Jañ-Mai, Aotrou Mêr.

Ar mêt a hwehas e jave:

—« Hervez ar galloudou dileuriet din, me a ginnig deoh, Jañ-Mai, medalenn ar zoudarded.

An daelou a ruille war bizaj ar paotr koz ha ma 'nije ket bet e vaz da zerhel anezañ 'n e zav, e vije bet kouezet zur mad e palamoutig.

—« Poent 'oa reiñ eur vedalenn da Jañ-Mai, 'me Lommig. Tremen tri-ugent vloaz 'vid amzer e « verit »... Amzer o-deus bet da brederia e Pariz!

—« Tra-walh a virvill 'vid kas anezañ d'ar béd all, n'gav ket dit, Jakez?

—« Va gwella gourhemennou, Jañ-Mai, 'me ar Mêt ouz en vriata anezañ.

—« Mersi, mersi, Aotrou Mêt, 'me ar paour-kêz koz ouz en daskrena e vouez.

Hag ar mêt 'trezeg ar pevar all, Mai o heuill anezañ gand ar medalennou spillennet war eun dorchennig ruz.

—« Med, Lommig, ar pevar-mañ a zo gwall-yaouank 'vid beza bet greet gante ar brezel diweza. Ne oant ket ganet e 39!

—« Ale, ale, Jakez, 'rabad ober goap diouz zoudarded Kerlankon. 'Baoe ar brezel diweza, e zo bet kalz a vrezeliou all dre ar béd... En Afrika, en Indez-Sina, da skwer...

—« Ze zo gwir, Lommig! Ar brezel a led ordinal e vantell ruz war an tamm douar patatez-mañ... Ar pevar-mañ a zo 'ta zoudarded bet o stourm en Aljeria?

—« Ya, paotr Lomm, ha miret o-deus, kred 'hanon, eur zoñj fall diouz ar brezel daonet-se. Pegement diouz o mignonned, daoust deze da veza bet kaset d'ar vro-ze evid « lakaad an urz! » 'vel lare dim ar gouarnamant d'ar houlz-se, a zo bet gloazet ha lahet gand ar Vorianed!

—« Ya, med ar re-mañ, e vedalenner aneze hidiv, a zo distroet d'ar gêr, bev ha yah... Ne gomprenan ket perag e kinniger medalennou deze.

—« N'eo ket red beza bet gloazet er brezel evid kaoud eur vedalenn, e Bro-Hall, Jakez. Gwechall, amzer an trevadennou, nag a vartoloded hag a zoudarded an Inizi o-deus bet an « Nicham Iftikar » pe an « Ouissam Alaouite ». Ha marteze 'teus bet klevet komz diouz eur penn-braz, anavet mad en on bro, hag e oa bet kinniget dezañ medalenn ar « Hant mil olifant gwenn. » Pesort tropell, neketa? Gweled a rez, n'eo ket red mond da vrezelia evid kaoud eur vedalenn!

—« Ar pevar-mañ, ma komprenan mad, a zo bet 'ta medalennet evid bezañ bet kaset da lakaad an urz en Aljeria...

—« Ya, an Urz, 'vel larez. Komprenet 'teus erfin.

Fin 'nevoa ivez an Aotrou Mêt da staga ar « bitrakaj » ouz bruchedou gloriuz va henvroiz ha dija e oa o vond da dreiñ kein d'on femp stourmer pa halvas Nestig anezañ:

—« Aotrou Mêt, c'hoaz ho-peus eur vedalenn all da reiñ din...

—« Eur vedalenn all, Nestig? Ha pesort hini 'ta?

—« Hini « Kampagn Bro-Sina », aotrou Mêt...

—« Med den 'nevoa laret din e-tevoa bet ar vedalenn-ze? Mai!»

Mai a dostaas ouz en grena, rag kounnar an aotrou Mêt a oa terrubl. Med Nestig hag ah anave mad an Aotrou a respontas:

—« Me ho ped d'am digarezi, Aotrou Mêt. Ankouaet am-oa reiñ ar vedalenn da Vai... Med kentoh evid retom eur wech c'hoaz, neketa, Aotrou Mêt...

—« Mad... Komprenet 'm-eus. Kenkoulz, 'vel larez, ober toud an traou asamblez. Ro din ta vedalenn...

Ha Nestig da furchal 'n e hodellou.

—« Setu aze, Aotrou Mêt.

Hemañ, pres warnañ da vond da gemer an « apero » 'barz zal-vraz ar mêrdi, ne zellas ket outi. Tosteñ a reas diouz Nestig ha « Hervez ar galloudou dileuriet... » dezañ, « hag all... », e stagas ouz porpant e genvroad ar vedalenn.

Gustav, eun archer war e leve, hag a oa 'n em hichenn, a roas din eun taol-lagad en eur vouse'hoarzin.

—« Jakez, klevet 'teus bet komz, eur wech bennaked, diouz medalenn « Kampagn Bro-Sina »?

—« Ma fe, kleo, Gustav, va henta kleved an hini eo.

—« Ne gav ket dit e vije kentoh ar vedalenn-ze medalenn an « Iñdochin »?

—« Posubl 'walh, Gustav; kement a vedalennou a zo bremañ, lagata? Koulskoude me gave din ne oa ket bet Nestig o vrezelia kostez Saigoñ.

—« Ankouaet ho-peus, 'me Fañch, hag a chilaoue ahanom, e oa Nestig

eur martolod-koñvers. Kap 'walh eo bet da veza prenet e vedalenn 'barz eur stal-bitaklaj bennag e Hong-Kong, pe e Changai.
-« Ne vefen ket estonet diouz se, farser 'vel m'eo.
-« Gwella tra on-eus d'ober, 'me Gustav, eo mond da ginnig dezañ on gourhemennou ha da houl' digantañ war ar memez tro diskouen dim e vedalenn.

Ha nim o vond da zerri e zorn da Nestig, sard 'vel pemp kwenneg.

-« Diskouen dim ta vedalenn 'ta, Nestig!
-« Eur vedalenn ral, ma zo unan, 'me Fañch.
-« A-dra-zur, 'me Gustav. N'anavan den ebed e Kerlankon ha 'barz ar hanton hag e-nije bet ar vedalenn-ze.

Nestig a zistagas e vedalenn hag he astennas da Lommig.

-« Gwelet 'teus? eme va hamarad... Eur vedalenn arhant... arhant fetiz ha koz, ma plij!
-« Zell ouz 'pez a zo skrivet warni 'ta, 'me Fañch.

Ha me da zelled piz ouz ar vedalenn. Ha petra a lennis warni? Chi-laouit mad, me ho ped, ha chomit 'n ho sav:
Fou-Tcheou - 1884.

Ya, klevet ho-peus, 1884. Med, non-de-die, ne oa ket ganet on Nestig, na memez e dad, d'ar mare-ze!

-« P'leh an daonet 'teus kad ar vedalenn-ze, koz kanfard, a houlenis gand on « zoudard koz ». Ti eun trokataer...? 'Barz grignol da dad koz...? Petamant, prenet e-tije bet anezi e Changai pe e Hong-Kong?

Nestig a vousc'hoarzas ouz en ober din eur zerr-lagad.

-« Eur vedalenn gaer, neketa, Jakez? Hag a dalv ker!
-« Pa laren dit, eme Lommig, e talve 'boan dond d'ar bourk 'vid ar beure.
-« Evuruzamant 'n-eus ket taolet pled an Aotrou Mêr ouz 'pez a oa skrivet war ar vedalenn! Estonet on, memestra, 'n-eus ket goulet e « vrevet » gand Nestig.
-« Dihortoz e oa! Ha neuze, marteze e oa muioh a bres warnañ hidiv. N'ema ket a-du gand ar cheñchamant, diouz klevet...
-« Pesort afer ma houfefe eh eo bet touellet gand Nestig, eur marto-

lod-koñvers, heñ hag a oa ofiser 'barz an arme-vor! Ober goap diouz an arme-vor...

-« Ha diouz ar Republik! Hini ar cheñchamant, war ar marhad!
-« Ma'h afem da lipad eur chopinad, bremañ, da lida ar cheñchamant, nim hag a zo a-du gantañ?
-« Goude « aperitif » ar « zoudarded koz », Lommig.

Ma lennet an istor-mañ hag a zo gwir-bater, n'it ket da lared d'Aotrou Mêr Kerlankon e oa bet touellet, deiz gouel ar Republik, bloavez ar cheñchamant, gand va hamarad Nestig. Ha ma kavet an oristal-mañ, da zerr-noz, 'barz eun ostaleri bennag, na houlenit ket gantañ pegeid 'zo n'eo ket bet ober eun dro kostez Fou-Tcheou. Kas a rafe ahanoh da gankaria-noz...

Visant an Askol.

Aotrou KERMARIA

AR BREZONEG

dre

an

TREUZVIEZADENNOU

**Rakskrid, diskoulmou ha geriadurig
gand**

P.M. MEVEL

Priz : 10 lur (70 g)

Notennoù war an anoïou-leh keltieg.

IV

Bro ar menezioù tougn

Petra hellfe eur brezoneger da soñjal, ma c'hoarvezfe gantañ, en eur droia gand e oto dre an Alpou, digouezoud amañ dirag eur menez anvet **La Vuzelle** (2564 metrad uhelder, e Planay, Haute-Savoie), ha pelloh dirag eun all anvet **La Muzelle** (3467 m, etre Entraigues ha Saint-Christophe-en-Oisans, Isère)? Soñjal a rafe, moarvad, e rank beza bet eno gwechall goz, o chom war-dro ar menezioù-ze, tud hag a gomze eur yez heñvel a-walh euz ar brezoneg, peogwir **muzell** a zo eur ger brezoneg, hag e teu da veza **ar vuzell** war-lerh ar ger-mell. Souezet a-vad e chomfe an den o weled eo bet greet **Muzell** pe **Ar Vuzell** euz beg eur menez.

Eur Gall desket a-walh a hellfe, dirag **La Muzelle**, soñjal er ger galleg **museau**, e galleg koz **musel**, euz eur wrizienn **mus**, bet gwisket **musum** e latin, ha n'ouzer ket e orin. Med evid eur Gall desket, kerentiaj e-bed etre **Muzelle** ha **Vuzelle**, tamm e-bed muioh eged etre **moulu** ha **voulu**, pe **malheur** ha **valeur**. Ar hemmadur **m - v**, ken boaz outañ kement hini a gomz eur vez keltieg, a zo dianavez kaer er yezioù a orin latin.

Hervez Victor Henri (**Lexique étymologique du breton moderne**) **muzell** (ha n'eus ket anezañ e kembraeg) a zo deuet e brezoneg euz ar galleg **musel**. Med ma'z eo ar ger-ze an hini a gaver e **La Muzelle** en Alpou, ne hell ket beza a orin latin. Ablamour d'e stumm kemmet **La Vuzelle**, e rank zoken beza a orin keltieg, da lavared eo galianeg, rag n'eus diskoulm all e-bed d'ar gudenn. Dre ze, ar Vretoned n'o-doa ezomm e-bed da vond da ampresti **muzell** digand ar galleg. En diou yezz ema ar ger a-zilerh ar galianeg, gand eur ster eun tammig disheñvel diouz an daou du: er galleg **musel** pe **museau** ema an **diou vuzell**.

Famill **musel** e galleg a zo niveruz-tre: **museler**, **muselière**, **musser** « rester le museau en l'air, flâner », **musard**, **musarder**, **amuser**, **amusement**, **amulette**, **musette** (instrument de musique), **cornemuse**... Ar galianeg n'eo ket maro mig e-barz ar galleg. E-barz ar brezoneg nebeutoh c'hoaz. Evid **muzell** e lavarer ivez **mourrenn** e Goueled-Leon -gand **ou berr** hag **rr kreñv distaget frêz**), liester **mourrou: lipad a ra e vourrou** « il se lèche les babines », Beza **mourrennog** n'eo ket eur merk a blijadur: « Faire un long nez » a ve lavaret e galleg. Eur **vourrouell** a zo eur verh tuet da vouza: **na jom ket aze da vourrouellad!** « ne reste pas là à boudler! » Setu skwerioù euz brezoneg beo Bro-Leon. Gwrizienn an oll herioù-ze eo **mourr**.

E meur a rannyez oksitaneg, **mour** pe **moure** a vez implijet evid lavared « museau, groin », hag evel ano-leh da verka eun uhelenn a stumm rond, tougn evel eur fri plad. En Alpou e kaver **Le Moure Haut** (2872 m), teir leo euz Barcelonnette (B.-A.), **Mourre Frey** (2027 m) war-dro Braux (B.-A.), **Mourelle** (1117 m) ha **Rochemuse** (1215 m) war-dro Bouvières (Drôme).

Ar ger brezoneg **mourrenn** en-deus, da gredi eo, eur henderv tost er ger galleg **moraine (de glacier)**: « emprunté au savoyard **morena**, proprement bourrelet de terre à la limite inférieure d'un champ en pente, dérivé du type **mor(r)e**, museau » (hervez W. von Wartburg). E Breiz ivez, en douarou-labour war o hostez, e heller gweled, e traoñ ar parkeier, muzelladoù pe mourrennadoù teo a zouar, bet ruillet d'an traoñ gand ar glaoeier, a-raog m'en-devez an eost gellet diwan ha kregi mad en e zouar. En Alpou, gwechall, e veze savet endro an douar-ze a baneradoù war laez ar parkeier.

Etre menezioù uhella an Alpou, e kaver c'hoaz stêriou skorn hag a ziskenne gwechall a-nebeudou war-zu ar blênenn, en eur ziskolpa euz kostezioù ha foñs an draonienn reier, mein, douar, gwez ha glazvez, hag a vountent dirazo evel eur vuzell pe eur vourrenn, « une moraine », gand o fri.

Er hantvejou ma teue an amzer da glouarraad, ar stêriou-skorn (« glaciers ») a deuze hag a gile, en eur lezel dirazo o mourrenn, ha da redeg diouto eur wazennad dour. Dirag ar vourrenn, an dour a jome sac'het, hag a bigne a-nebeudou da ober eul lenn, beteg beza uhel a-walh evid lammad dreist ar vourrenn: neuze e tigure **genou** al lenn, **Genau-a**, « **Genève** ». Unan euz ar plijadurioù a heller da dañva o troia dre ar Suis eo heda traoniennou dudiuz, enno lennou kaer ganet evel-se, harzet gand eur vourrenn astennet a-dreuz an draonienn.

Komzet em-eus euz fri ar stêr-skorn. Ar fri a zo tost d'ar muzelloù ha d'ar mourrou. Evid ar Gelted e helle ivez beza implijet evel anoleh, koulz hag ar penn, ar chouk, ar hein, ar vronn, ar hov, ar vegell, ar harr, an troad pe ar biz: her gweled a raim eur wech all.

Euz eur fri plad e lavarom eo tougn. Perag ne vije ket a veneziou tougn? **La Pointe du Tougne** (2709 m) a gaver en hanternoz Champagny-en-Vanoise (Savoie), **Le Mont du Tougne** (2475 m) e gwalarn **La Vuzelle**, ha **Tougnète** (2434 m) e mervent Saint-Martin-de-Belleville (Savoie).

Euz ar havadennoù-ze em-eus nevez komzet gand eur henvroad euz va 'farrez, eur helenner yaouank, hag a lavaras din oa bet o skia war diskennou an **Tougnète**, dispar evid ar sport-se. Deuet eo d'ar gêr didorr e ziouharr ha didougn e fri, youlet da vond adarre da weled bro ar menezioù tougn.

F. Falc'hun.

Komzou didro

Da lakaad Brud Nevez da veza bevoh ha buhezekoh bepred, on-eus goulennet digand lod euz or henlabourerien pe euz ol lennerien sevel ingal pe ingalloh pennadoù d'embann er gelaouenn. An hini kenta eo bet Mikael Madeg oh asanti, hag o kinnig deom e gomzou didro. Ar miz tremenet dija, e oam sañset da voulla anezo, nemed gand maro trumm P.M. Mevel, n'on-oa ket bet an tu d'henn ober. Anad eo ez int e gomzou, hag evel boaz, peb skrivagner eo a zo kirieg euz e skridoù er gelaouenn-mañ.

Diou eveziadenn ouspenn nemetken, a-berz skipaill Brud Nevez. Ez om prest, evel just, da zigemer eur pennad digand Jean Le Lagadec, pa'z eus kaoz anezañ, ha ma fell dezañ en em zisplega amañ. On-nevo tro da zistrei war darn euz ar hudennou istor a ra kaoz M. Madeg anezo, p'e-neus savet unan all euz or henlabourerien eur renta-kont euz leor pouezuz Michel Nicolas: Histoire du mouvement breton: Emsav, bet embannet gand Syros eun nebeud miziou 'zo. En hemañ, e skriv drez M. Nicolas: « On doit à la vérité de dire que la quasi-totalité du Mouvement Breton organisé politiquement a collaboré d'une façon ou d'une autre pendant la guerre » (p. 102). Ha ma zo lennerien all hag a fellfe dezo ivez diskliêria o zoñj...

B.N.

Peogwir n'ema ket ar skridou ha ar pennadou a vez embannet e *Brud Nevez* da veza lakaet war gont ar gelaouenn *heh-unan*, med war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken, deom bepred ha gwelet 'vo.

Komzom didro eta. N'em-eus ket eun ideologiez, da lavared eo eur sistem menoziou a ginnig din respontou resiz da gement goulenn a hellfe diwana em spered, eur sistem hag a zikourfe ahanon e peb mod da gompren perag ema peb tra e-giz m'emaint er béd-mañ. Menoziou 'm-eus avad. War boentou 'zo int resiz mad, war boentou all diresiz-tre. dre ziouer a anaoudegez, a ouiziegez hag a interest evid ar poentou-mañ. Ha war veur a dra n'em-eus soñj ebed koulz lavared. kement-mañ a zo, a gav din, doare ar peb brasa euz an dud e gwirionez.

Kement-mañ da lavared ivez em-eus eun tamm brao a zisfiziañs e-keñver anoioù 'zo a gustum kalz a dud taola e fas an eil re ar re all. Plijoud a ra din gouzoud petra ziniñ ar gerioù-mañ da genta, petra eo sañset dezo sinifia (ar pezh a zo eun dra all, aliez a-walh, 'm-eus aon). Ha setu adarre ar pezh a ra, sur a-walh, ar peb brasa euz an dud o-deus doujañs evid an dud all hag a glask implijoud o spered evid ar pezh n'eus nemetañ a hell ober.

*
**

Eun taol-êsa eo ar gronikenn-mañ, ma vez embannet e kendalhin da skriva, ma ne vez ket avad... e rin war-dro traou all. Setu ma 'm-eus bet divizet en em zoñjal eun tamm, didroidell kaer, war unan euz spontailloù politikel on amzer-ni, e Breiz. Kement-mañ peogwir eo embannet 'barz *Brud Nevez* 59 (p. 48) e-neus Jean Le Lagadec disklêriet e orogell goz *n'o-deus ket ar separatisted o flas en on touez*.

Termenom daou her da genta, ma keroh, kement ha kaozeal euz traou resiz: « emrenez » (hag « emrenerien », ar re a glask kaoud emrenez, pe evid eur vro pe eur gevredigez tud bennag all), ha « dizrannidigez » (ha « dizrannerien », ar re a stourm da gaoud anezañ, evid o bro, er peurliesia).

Mod ma komprenan-me ar politikerezh, an nebeud a ouezan diwar e benn, « emrenez » n'eo nemed eun afer derez: muih pe nebeutou a zo anezañ. Evel-se eur mêt en e barrez, eur rener en e uzin pe en e

skol, eur huzul-rannvro en e rannvro, e-neus anezañ mui pe vui. Lavared eo « emrener » eun den a ziniñ, kredabl braz, ema o klask kaoud *muih* emrenez, muih frankiz evid eul live renerez (parrez, departamant, rannvro).

Beza e hell beza ivez ne vefe ket a emrenez pa gav tud 'zo n'ema ket lakaet hemañ war al live a garfent e vefe lakaet. Evel-se ema kont gant Bretoned 'zo a houlenn e vefe Breiz emren hag a zoñj dezo e rankfe Breiz amañ sinifia ar « pemp departamant ».

Distroom neuze war ar poent-mañ. Gweled a ran e houlenn Jean Le Lagadec e vefe greet eur rannvro a-nevez euz ar pemp departamant. E giz all, en desped n'eus ket paperioù resiz ganin war ar poent-se, e kav din eo a-du an den-mañ evid ma vefe anvet ar huzul rannvro war eeün gand voterien ar rannvro-mañ. Ma houlenn ivez en-defe ar huzulioù rannvro eun disterra muih a halloud, pe a frankiz, da intent euz aferioù ar rannvro... Neuze 'vad ez eus eun emrener anezañ, da lavared eo e vefe otonomisted euz tud an U.S.B.I.F. (da vihanna ma vefent a-du gand eur prezidant a lavarfe kemend-all). Henn disklêria a ran adarre. an emrenez n'eo nemed eun afer derez er peurliesia. Evel-se e kavoh kalz mêtred en o farrez hag a zo emrenerien wir, o-deus c'hoant kaoud an dizober mui pe vui, pa ne ve ken war boentou resiz a zo (da skwer, nompaz senti ouz reolennou 'zo a ro urz dezo da baea frejou 'zo, war-dro skolioù 'zo...) euz beli ar prefeti.

Eur wech tapet ganto tud 'zo an derez emrenez a houlennont, e hellont divizoud eun dra a zaou: goulenn muih pe beza fastet gand ar pezh o-deus. Ma kendalhont da houlenn, ez int atao emrenerien, ma ne reont ket, n'int ket.

*
**

A-beleh neuze e teu ar fed e vefe bet 'pad eur pennad mad, e Breiz, eur spontail ar ger « otonomist » (a gav din beza lennet, e ster ar spontail a lavaran e gazetenn an U.S.B.I.F., deg vloaz 'zo, d'ar poent ma 'm-oa ar gazetenn evid netra dre ma reen skol vrezonég en o zi e Pariz)? Diouz ar fed e vefe bet implijet ar ger-mañ da envel paotred Vreiz Atao a-raog hag e-pad an eil brezel béd.

N'eus forz piou a zo onest e-keñver istor a oar ervad ez eus bet meur a hent choazet gand an otonomisted neuze. evel ma'z eus bet meur a zoare e-touez ar rezistanted hag ivez e-touez ar golabourerien. Lavared ar hontrol, kenderhel da ober ar meskaj (an « amalgame »), evel a zo bet

greet e-pad pell, a zo eneb istorel.

Gwir eo ez eus bet euz ar Bezenn Perrot, evel ma'z eus bet ivez euz al « Légion Charlemagne ». Kredabl braz, e-keñver Bro-Frañs dre vraz, n'eus ket bet muih a golaboratourien e Breiz eged e Bro-Hall. Hag e-touez an otonomisted n'int ket bet an niver brasa na tost. Soñj 'm-eus beza anavezet mad eun den a oa e kevrenn Breiz Atao lise Sant-Malo, just a-raog ar brezel. Da lavared eo eun otonomist. Eun deg bennag a oa anezo, hag armet e oant. An den-mañ, e-neus bet dalhet a-hed ar wech d'e venoziou e-keñver emrenez Breiz, a lavare din e oa bet unan anezo o vond a-du gand an Almanted, tra ma oa eet a-du gand ar rezistañs an oll re all (d'eur poent ma n'oa ket gwall-sklêr emzalh ar gomunisted, e-keñver ar pez eo bet goude-ze). An den-mañ e-unan a zo eet da Vro-Zaoz hag alese eo bet kaset endro d'e vro, war-lerh e gentelia, d'ober war-dro rezistañs.

*
**

Bezom sklêr neuze. N'emaon ket war dachenn ar stourm politikel amañ (e leh ma vez implijet forz peseurt arguzerez, mad pe fall, da drehi war an enebourien). Chomom war dachenn ar menoziou diazez.

Istoriou Breiz Atao ha toud a zo echu, estreged evel danvez studi evid an istorourien. Ar re a lavar (e-giz ma 'm-eus klevet c'hoaz pemp ploaz 'zo en eur sindikad): *ar re-mañ eo red kaoud enebiez outo rag e-pad ar brezel...*, n'int ket tud onest.

An den ne daol ket evez ouz ar pez a lavar war an dachenn-mañ eo arabad dezañ beza souezet e pakfe war e fri rag eñ e-unan a ro eur gentel fall. Lakit e balañs an istor an niver a dud lahet (bezom kriz) gand tud Bezenn Perrot e-keñver ar re a zo bet lahet diwar urz mevelien Hitler ha Stalin... bezom siriz memestra. Pe neuze e hello beza implijet e-keñver tud 'zo an dro-lavar « anti-séparatisme primaire », diwar batrom unan anavezet-kaer.

*
**

Petra neuze eo an « dizrannidigez »? Eur spontaill evid ar merhed koz hag ar bolitikachourien eo, sur. Med e-keñver filozofiezh politikel? Eur menoz, eun doare ober evel ma'z eus meur a hini all. Na muih na ne-beutoh.

« Dizrannidigez » a ziniñ amañ e vefe eur stad vreizad. En apsolu n'eus

ket da veza feuket gand ar menoz-mañ. N'eus forz piou a anavez eun tammig istor ar béd abaoe hanter-kant, kant pe kant hanter-kant vloaz 'zo, n'e-neus nemed kaoud soñj euz kartenn bolitikel ar « stadou » a zo anezo bremañ hag ar re a oa neuze. Eun diskoulm mad pe fall e hell beza en eun digouez pe digouez, eun dra a houlenñ kalz tud kaoud d'eur poent en o istor ha padal ugent vloaz en a-raog ne houlenñ ket

Na ped treuzvenoz, ragmenoz, ha spontaill politikel a vez hejet evel-se dindan fri an dud e korn tro eur varvailladenn. Na ped klêche a vez pourmenet euz eur gaoz d'eben dre eur vro, buannoh eged na dremen ar billejou kant lur euz eun dorn d'egile.

Penaoz, eme kalz tud, e hellfe Breiz beva disparti? Hag e kendalh ar farserien en eur brodui bouteier-koad hag artichoad? An dra-ze eo politikerezh siriz? Pa vez an oll stadou er béd bern war vern en o dieou e-keñver an oll re ar re all. Ar gudenn eo n'en em zoñj ket an dud, ne lakont ket, nemed ral e vefe, en eur geñver ar pez a hellont da lenn bemdeiz en o hazetennou. Ar heleier-ze ne reont nemed tremen warno evel ar glao war bluñv eun houad.

*
**

Kaoud eur stad disparti a zo eun doare d'an dud a vev dindan beli ar stad-ze da gaoud tro da veza mui pe vui emren. Med n'eo ket kalz muih. Tra-walh a skweriou a zo en istor euz stadou sañset dizalh hag a zo e gwirionez renet euz diavêz.

Evidon-me n'eus nemed eun dra a gonto pa vo ano ganin da voti hag eo hemañ: en degouez-mañ-degouez, petra eo an doare gwella, efedusa, petra eo ar sistem politikel a gav din a roio tro d'an dud tro-dro din, ar muia posubl anezo, da chom beo, da genta, da veza didrabas en o buhez, da eil, ha ma'z eus moyenn, eur wech tizet ar paliou diazez-mañ, da veza eüruz e kement hag e hell eur gevredigez kaoud pouez war eürusted an dud a-unan.

An traou all a zo spontaillou. Diwar-benn tud a-walh e vez gelllet lenn el leoriou istor, hag o-deus cheñchet tu d'o chupenn, pe henn anzavent pe ne reent ket, evid na rafen ket kalz a van gand ar spontaillou-ze nemed da stourm outo evel spontaillou.

*
**

Marteze emaoñ o klask gouzoud petra zoñjan-me neuze e-keñver em-

renerez Breiz hag an dizrannidigez? Setu petra zoñjan: e kement hag e vez kavet tud barreg da ren o aferiou en eur zoñjal da genta e mad an oll, ha n'eo ket en o interest dezo o-unan, neuze eo eun dra reiz, e-keñver moraliez, o-defe ar re-mañ ar galloud d'henn ober, ne vern war beseurt live e vefe, parrez ha bro, hag an oll dereziou galloud a vez c'hoant da gaoud etrezo.

Ha beteg peseurt poent an emrenerez-se? Beteg ar poent o-deus o-deus ind-i c'hoant. Me, da vihanna, troet ma'z on gand sevenadur Breiz evid ma vefe anezañ eur vleunienn gaer e sevenadur an ollved, hag eun elfenn a-bouez er blijadur veva er vro-mañ, a responto dre ar goulenn-mañ n'eo ket unan:

Eur stad iwerzonad a zo, tra n'he-deus Bro-Gembre nemed dereziou emrenerez (ha muioc'h pe nebeutoc'h eh implij anezo e lodennoù disheñvel euz ar vro). Peseurt hini euz an diou yez, euz an daou zevenadur a zo er stad wella?

Hag adarre n'eo ket kement-mañ eur respont krenn ha krak. Mann nemed elfennoù a rankfe sikour ahanom d'en em zoñjal. Rag evidon-me, *en devez hirio*, n'eo ket gand ar gudenn kaoud eur stad pe get ema an dalh.

Mikael Madeg.

Mikael MADEG

PEMP TROAD AR MAOUT

danevellou

434 bajenn.

30 lur - 550 g.

Keleier ar miz.

Euz an eil devez d'egile

— Jazz a glever bremañ e-pad an abadennoù brezoneg war an tele. Daou pe dri bloaz 'zo dija, e-noa bet **Philippe Briand** kemeret perz en eun abadenn **Breiz o veva**. E miz c'hwevrer he-deus **K. Nogues** kinniget ober anaoudegez gand unan all euz o henvroiz, **Eric al Lann**, eur c'hoarier jazz anezañ ivez. Abaoe 78, e seblant ar zonerezh jazz beza kalz gwelloc'h prizet e Breiz. Ouspenn ar gouelioù hag ar festivalioù a vez niveruz e-pad an hañv (e Brest, er Roh-Ugu...) ez eus bet klasket displega en eul leor petra eo ar jazz e Breiz an deiz a hirio: 10 strollad, 15 laz-seni, war-dro 50 muzisian, med n'eus hini ebed anezo o veza a vicher... Tra-walh evelkent da lakaad lod 'zo da sponta dirag « eur jolori » ken « skrijuz », « eur safar » ken « diston ha divent », hag « eun talabao morian amerikan », evel a skrive **Y.V. Kerwer-c'hez** en e romant **En ur rambreal** adembannet n'eus ket pell 'zo.

— War stankaad ez a an daremprejoù etre Breiz hag Iwerzon. « Dimeziou » a zo bet sinet dija etre eun 30 bennag a gomunioù ahan hag a gêrioù euz Iwerzon. Prestig e tle beza lidet lod all. Med pell e ver peurliesia o skoulma daremprejoù, ha kênoù zo ahann n'o-deus ket kavet o far c'hoaz. **Paolig Montjarret**, e penn ar vreuniez **Bretagne-Irlande** ne ra nemed bounta. Savet e-neus eur genstrivadeg a dresadennoù evid ar vugale 11-15 vloaz, diwar-benn an daremprejoù dre vor etre an diou vro euz ar pevare kantved beteg hirio. 100 beaj dond ha mond etre Rosko ha Cork a zo da honid.

- Muioh a vad a ray an digreizenna d'ar hêriou braz evid na ray d'ar homuniou bihan. Setu ar pezh a zoñj unan euz renerien ar P.S.U., an ao. **Bolze**, a zo deuet e miz c'hwevrer da Bont 'n-Abad, d'ober eur brezegenn diwar ze. Evitañ avad, e chomer re da ruza gand al lezennou diwar-benn an digreizenna.

- Dre ma vefe dre amañ kalz skrivagnerien ha ne deuont ket a-benn d'embann o skridou, ez eus bet savet e Sant-Brieg eun ti-embann dindan stumm eur gevredigez **L'Eventail** an hini eo anvet. Eun dastumad danevellou a vo al leor kenta dezañ da voulla, diwar-bluenn tud anavezet ha darn n'int ket, en o zouez da nebeuta **Glenmor, Y. Gwernig, D. Letessier...**

Diouz e du, e-neus eun embanner yaouank all deuz Roazon, **P. Camby**, lakeet tri leor da zond er-mêz war e ano: skridou damankounahet gand **E. Renan** hag **A. ar Braz**, hag eul leor nevez gand **J.C. Pichon**. Gand **Paol Keineg** ha **Denis Rigal** ez eus bet savet c'hoaz eur gelaouenn a varzoniez, anvet dres **Poésie Bretagne**. Felloud a ra dezo rei da anaoud testennou ha ne garfent ket e chomfent da loueda 'barz tiretenier, ha rei ar gomz da dud hag o-deus eun dra bennag a nevez da zisklêria.

- Eun dezenn doktorelez war ar zaverien kanaouennou-pobl a zo bet divennet dirag skol-veur Vrest gand **Daniel Giraudon**. Gini-dig deuz Binig, o chom bremañ e kostez Lanuon, e-neus D. Giraudon desket brezoneg, hag e-neus bet ar chañs da goueza eur wech war eur pakad a 300 a zoniou hag a werziou. Kerkent e-neus lakeet en e benn studia anezo, da houzoud penaoz e vezent savet ha gand piou, petra veze kontet enno, penaoz e vezent skignet da geñver ar foariou hag ar pardonioù. Plijadur e-neus bet D. Giraudon dreist-oll, emezañ, o kaoud ar roud deuz ar barz dall **Yann ar Gwenn**, a oa euz Priel...

- Etre kêr Vrest hag hini Bir-N'Zaran, er vro sahraoui, ez eus bet sinet e miz c'hwevrer eur hontrad a vignoniaj, e galleg, en arabeg hag e brezoneg. A-raog ar brezel e oa 60.000 a dud o chom e Bir-N'Zaran, n'eus ken nemed eun 10.000 bennag.

- Bodadeg-veur ar zo bet gand **Dastum** e Loudieg. Kerse eo bet gand an dastumerien a oa eno e vije atao ar memez re, sañset, o vond da labourad war an dachenn. E-pad an daou vloaz a zo o tond e tleont ober enklaskou da houzoud petra eo, evid an dud,

eur vro evel Leon, Treger... e kement kêrver a zo: e-keñver yez, dillajou, sevenadur, hag all... Eul labour all emaint e soñj d'ober diwar-benn ar c'hoariva. Kenlabourad emaint e soñj **M. Madeg** d'ober gand **Dastum** d'embann **Komz**: eur vandenn vagnetik, hag a vije eun destenn dre skrid da vond d'he heul, da zikour ar re a zo o teski pe o peurzeski ar yez...

- E Roazon eo bet dalhet Breujou-Meur ar Zevenadur e Breiz. Deuet e oa pennou braz euz Pariz da geñver an digouez-se, en o zouez **Herri Giordan**, an hini e-neus savet ar raport brudet a zo war e ano. N'eus ket bet greet kalz a drouz endro d'an deveziad-ze. Kaoz a zo bet a-nevez euz « culture bretonne » hag euz « culture en Bretagne ». Klevet eo bet e fin an devez e vije dalhet ar Huzul Sevenadurel (ledannaet) da bleal gand ar hudennou a zevenadur e Breiz.

- E Brest e vo kredabl nevezentiou dambrest e Ti ar Zevenadur. Peziou-sonerez gand **Per-Yves Moign** ha **Paol ar Flemm** a zo da veza c'hoarvet gand laz-seni **Paol Kuentz**. E miz even, eo sañset **Strollad ar Vro-Bagan** da hoari tri pe bevar euz peziou **Roparz Hemon**. Goulennet ez eus bet digand **Paol Keineg** skriva eun drajedenn hag a vo leurenniet gand rener Ti ar Zevenadur e-unan, **Daniel Hanivel**.

- E-pad ar hampagn evid ar votadegoù tiez-kêr, ez eus bet komzet a-wechou deuz al labour a hell beza greet gand ar homuniou war dachenn ar yez: implij ar brezoneg en ti-kêr, panellou en diou yez, pennadou e brezoneg war ar hannadougou-parrez, brezonekaad an anioù-strêjou, hag all... Skrivet e-neus **Emgleo Breiz** d'al listennou a oa war ar renk, hag eur roll deg goulenn e-neus savet **Skol an Emsav**, o heti dreist-oll ma vije anvet e peb kuzul unan bennag da heulla an traou da zeveni war dachenn ar brezoneg...

- Anavezet mad eo dija an **U.D.B.** gand an oll, ha 300 a dud a oa war ar renk diouz he ferz e-kerz ar votadegoù diweza. Ha ne vije ket an emzao broadelour o tond war horre endro? Tri strollad da nebeuta a glevet bremañ oh embann menozioù broadelour: **Emgann** (hag a lako prestig eur gazetenn da zond er-mêz), **Pobl** (hag a zispleg e gredennou war **L'Avenir de la Bretagne**), ha neuze **Douar-Breizh - République Bretonne**. Eur gazetenn eo a zo euz an titr diweza-mañ, hag a vez skrivet warni heb damanti

ema ar Hallaoued da veza lakaet er-mêz (deuz a Vreiz), hag e tle ar brezoneg dond da veza yez vroadel nemeti ar Vretoned. Sañset n'eo « Douar-Breizh » nag a-gleiz nag a-zehou. Anzao a ra ivez ez eus c'hoaz eur bale hir d'ober a-raog beza lakaet ar brasa niver euz ar Vretoned da zigemer he zezennou.

– 25 bloaz e-neus ar **Service Social Breton** e Pariz. Kantajou a dud eo a dremen drezañ beb miz, da glask eur skoazell pe eur zikour bennag. Savet e oa bet da genta gand an dimezell de Plignières, da zigemer ar bretonezed yaouank ha ne ouient ket piou mond da gaoud eur wech erru e Pariz, da viroud outo da jom o-unan pe da drei fall. A beb seurt sikourioù a ro bremañ an S.S.B. d'an dremenidi, hag ousspenn, loja 140 a Vretonezed yaouank eet da Bariz da labourad er PTT pe en ospitalioù.

– Friko a zo bet e Gwengamp gand ar gazetennig **Evid ar Brezhoneg**, bet savet e 1974 gand Claude Henry da glask deski d'ar vrezonegerien lenn o yez. Ema an 200ved niverenn da veza embannet e miz meur. 30.000 skwerenn euz ar gelaouenn, chomet beteg-henn heb beza skignet, a zo da veza ingalet evid netra.

– Ar hooperativ **Breiz** a zo ivez 25 bloaz ma'z eo bet savet gand Kendalc'h ha strolladoù all. Abaoe n'he-deus greet nemed kreski. Gwerza leorioù ha pladennoù dre lizer a ra dreist-oll, med teir stal a zo bet digoret ivez er Baol, e Roazon hag e Pariz. Ouspenn e werz kement tra a vez embannet diwar-benn danvez Breiz d'eur 600 a varhadourien leorioù ha pladennoù. Trizeg a dud a zo bremañ o labourad er hooperativ, gand Yann Goasdoue en o fenn. Al leorioù diwar danvez Breiz a vez gwerzet 1500 skwerenn, well waz, euz pep hini anezo, ha pa dapont 3000 e vezont dija eur best-seller, emezañ. Ar re vrezoneg a werzer nebeut anezo, se zo sklêr. Gand ar hooperativ « Breiz » e vez skignet ivez leorioù **Brud Nevez**.

– E miz genver 1933 – 50 vloaz a zo eta – eo bet krouet an emzao **Ar Falz** gand **Yann Sohier**, hag a varve-eñ daou vloaz diwezatoù, d'an 21 a viz meur 1935. Kelou on-eus bet e vo lidet gand Ar Falz « hanter-kantved deiz-ha-bloaz he hrouidigez dindan stumm eun diskouezadeg a vo dalhet e mirdi Montroulez, e miz even da zond.» Setu m'ema o klask fotoioù, skridou, dielloù, ha traou a beb sort, diwar-benn Yann Sohier, hag ivez diwar-benn stad an traou e Breiz etre ar bloavezioù 1920 ha 30. (6, strêd Hir,

e Montroulez).

– Evel beb bloaz abaoe 1977, eo bet roet gand ar **C.I.S.L.B.** (e brezoneg: **Ar Huzul Etrevroadel evid Kendalh ar Brezoneg**) eur priz lennegel d'eul leor brezoneg. Evel beb bloaz kazimant, eo bet roet ar priz d'eul leor embannet gand unan euz ar strolladoù a zo bodet e **Kuzul ar Brezhoneg**. Ar bloaz-man eo eta **Garmenig-Ihuellou-ar Menn** he-deus bet anezañ evid **Pebezh fest-noz!**: eur romant berr evid ar grennarded, embannet gand **Skol**. En em houlen a reer memestra penaoz e ra tud ar C.I.S.L.B. da varn ha d'ober o dibab e-touez al leorioù a vez moulllet beb bloaz en or yez: kement ha kement a vouezioù e-neus bet, da eil, eur renta-kont beaj hag eul leor... a speredou-riez embannet dindan stumm pedennoù euz Iliz an Trede Diskuliadur... Med perag pas?

– A-benn ar fin, ez eus bet skoulmet daremprejoù nevez etre ar skolioù brezoneg **Diwan** hag an Deskadurez. A-raog miz mae 1981, n'en em anavezent ket, pe e reent van da nompaz henn ober. War-lerh ar cheñchamant, e oa deuet Diwan da gomz kreñvoh-kreñva, beteg lakaad 3000 bennag a dud da vanifesti e Kemper a-raog an hañv diweza. Abaoe eun nebeud mizioù, ne veze ket klevet komz a galz tra ken, ha divrud e talhas Diwan eur vodadeg-veur e Gwengamp, heb na vije kelou anezi war ar hazetennou. E gwirionez, e oa divizou en hent eur pennad a oa, ha setu ma'z eus bet kavet eun emgleo etre Prezidant Diwan, **A. Lavanant**, hag ar Rektor **Rollin** en ano an Deskadurez.

Hervez an emgleo-ze, ema an deskadurez o vond da rei dre zioù wech da Ziwan eur yalhad a dalvezo evid ar bloaz tremenet hag ar bloaz-mañ da stanka an toull a zo er hef. Diwar miz gwengolo, e kenlabouro Diwan hag an deskadurez e-pad tri bloaz: bez' e hello ar skolioù brezoneg derhel da drei evel bremañ, nemed e vint kontrollet e-keñver pedagogiezh hag e-keñver budjed. Pêet e vo ar skolaerien gand an deskadurez (m'o-deus ar vachelouriezh da nebeuta), nemed ne hello ken Diwan digori skolioù all heb derhel kont euz kartenn ar hlasou diouyezeg ema e soñj an Deskadurez da zigori diouz he zu. A-benn 1986, e vo greet eur gont euz ar henlabour da houzoud ha frouezuz e vo bet evid an daou du pe ne vo ket, hag e vo gwelet neuze ha prevez e chomfe ar skolioù Diwan pe digemeret e vijent er zervij publik.

Sed aze eun emgleo a-bouez a-dra-zur.

Goude ma vije bet embannet ar helou anezañ, o-deus renerien Diwan roet kerKent da houzoud e tigorfent 14 klas all ahan da viz gwengolo, ousspenn an 23 a zo bremañ. KerKent all e responte ar Rektor Akademie ne vije sikouret ar re-ze, hervez an emgleo a zo bet sinet, nemed ma vezont e diavéz euz kartenn ar hlasou diouyezeg. Bresk a-walh e seblant beza c'hoaz an daremprejou etre an daou du, war a zeblant.

– 145 a dud eo a zo bet kemeret da labourad war dachenn ar zevenadur e Breiz, e 1982, hervez komzou Minister ar Zevenadur. Er 6ved renk ema Breiz e-touez an oll rannvroioù.

– Kenstrivadegou biniou braz a zo bet e Brest, aozet gand **Kreizenn an Arzou Pobl**, d'an 19 ha d'an 20 a viz meurzh, hag o-deus bodet pevar biniaouer a Vro-Skos ha 4 Breizad. Tri don o-doa da zon: unan pibroc'h, unan all a Vro-Skos, hag unan ahan. Da zon an toniou euz o bro eo ar Skosiz a zo bet ar re grefiva, med evel boaz eo **Patrick Molard** a zo bet ar gwella da zon an ton breizad.

– An eurvad o-deus bet eun toullad Bretoned da veza priziet gand **Akademie Charles Cros** ar bloaz-mañ. 25 a brizioù a vez roet ganti da bladennou nevez deuet er-mêz. Unan anezo he-deus bet **Mari Harnay** evid he hanaouennou koz a vro-Pourlet hag a glever war eun disk bet embannet war eun dro gand Dastum ha Radio-France: gwerzet e vez dindan ar merk Ocora, niv. 558603. Unan all e-neus bet ar haner **Gérard Delahaye**, evid e bladenn ziweza **Week-end and Co**, embannet gand Pluriel: Finisterian eo eñ, ha gwechall e oa unan euz re ar kooperativ Nevenoe. An trede da veza bet eur priz eo **Patrick Bertin**, eur haner euz Roazon anavezet a-walh dija, daoust ha ma n'eo ket kement ha ma tleje beza.

Faltazi Alan an Diuzet.

Alan an Diuzet a zo anavezet mad gand ar vrezonegerien. E leorioù a zo leun a faltazi; skrivañ a ra eeun a-walh evid bezañ komprenet gand an oll. Plijoud a ra dezañ kontañ buhez an dud izel hag o ferzioù mad.

El leor-mañ, **Lenaig**, eun Otrou uhel, enoret gand e genvroiz, a gouez e karantez evid eur plahig diwar ar mêz. War-lerh skoillou e-leiz e teuont d'en em adweled hag, erfin, da zimeziñ.

Abaoc e-neus skrivet **An Diuzet** eun eil leor all, disheñvel: **Ar Gward Méziou**, leun a istorioù bihan diwarbenn ar garantez en eur gêniadenig; ar gward a zo fuloret. Eun torfed a zo bet greet er barrouz; siwaz! ne vo kavet ar vuntreien nemed war-lerh o maro; neuze e vo anavezet a-begou ar muntr.

Alan an Diuzet e-neus skrivet kalz a leorioù a beb seurt e brezoneg hag e galleg, darn aneze evid ar vugalez. Yannig, Kentelioù skol, ha farsadennou e kelaouennou sizunieg.

R.B.

Lenaig, gand **Alan an Diuzet**: 20 l. (220 g). Tresadennou gand **H. Coatleven**. Diwezatoù e vo embannet **Gward ar Méziou**.

Leorioù all gand Alan an Diuzet: **Gwad ar garantez** (10 lur - 100g), **Peskêter ar skom** (diwar Loti) (17 l. 90g), **Rollan Troad-Houarn** (diwar Feval) (10 lur - 70g).

Bleun-Brug

Dilun, dimeurz, dimerher...

Rimadellou nevez evid ar vugale

20 lur (200g)

Sklêrijenn war al liester.

E galleg, pa skriver **les écoliers lisent**, e verker teir gwech an niver. Med e brezoneg, n'ez eus nemed an ano warnañ merk al liester: **Ar skolidi a lenn**. Pouezuz eo eta al liester en or yez. Med nag a zoareou d'e verkal! Hag an hini a skriv e brezoneg, ma fell dezañ beza lennet gand brezonegenien euz peb kom a Vreiz, a rank dibab stummou hag a vo komprenet gand ar peb brasa anezo. Rag stummou 'zo ha ne dint ket anavezet dre oll; ma reer ganto, e vo mad lakaad eun notenn e traoñ ar bajenn. Hervez al leoriou yezadur, « direiz » int.

Pal **P. Trepos** e **LE PLURIEL BRETON** n'eo ket hini eur « barner a yez », o tisklêna petra 'zo « reiz », petra 'zo « direiz ». Komz a ra evel just euz ar furmou skrivet hirio, med studia a ra ivez kalz a stummou all, greet ganto er brezonegou komzet. Evel m'o haver en **Atlas linguistique de Basse-Bretagne**, bet savet gand **P. Le Roux**, bremañ 'z eus hanter-kant vloaz bennag.

E kalz a yezou n'anavezer nemed an unander hag al liester. Evel e galleg. Er yezou keltieg, er brezoneg eta, e kaver ouspenn an anostroll (**plouz**), an unanderenn (**plou-zenn**), an niver-daou (**daoulagad**). An oll furmou-ze, hag al liesteriou en **ou, iou, i, ed, ien...**, a gaver displeget e leor **P. Trepos**. Keñveria 'ra doareou ar brezoneg hirio gand re ar hembraeg hag ar herneveg; hag ivez gand ar re a gaver er geriadurioù a wechall: Gregor a Rostren, Le Pelletier, ar Hatolicon..., pe en anoiou-leh. Evel-se e hell merka penaoz he-deus ar yez emdroet a-hed ar hantvejou, e leh-mañ-leh. Kompren

a heller gwelloc'h, da skwer, al liesteriou doubl evel **parkou / parkeier**, hag an divera er gerioù, verbou hag all. Sklêrijenn a zigas war an anoiou-leh, chomet en o stumm a-wechall, zoken ma ne ra nemed diskouez eun hent gand e vartezeadennou.

Danvez founnuz, skwerioù niveruz, euz a beb leh, evid diskouez reolenou... an « direiz ». Pe gentoc'h, ar re heuliet, heb gouzoud dezañ, gand ar brezoneger o komz evid beza komprenet gand tud e gornad, en eun amzer ma ne oa ket kalz a zaremprejou gand tud euz a-bell. Diskouez a ra stad eur yez « digreizennet », diskol pe dost, peb komzer oh ober ganti hervez doareou distaga e dolead, heb Akademiezh da grenna dezañ e veg... pe e bluenn, ma venne kana e levenezioù pe e hlaharioù, « kompozi » eur werz goude eun darvoud. Kompren a reer gwelloc'h spered ar brezoneger, peizant pe vartolod, en eur studia penaoz e c'hoarie gand jeu al liesterioù evid disklêna arlivioù e venozioù.

Med, ha bez' e heller kenderhel gand ar c'hoari-ze?

Kerbig.

Per Trepos: Le pluriel breton, eil moulladur gand **Brud Nevez** hag

Emgleo Breiz: 30 lur (400g)

Per Trepos: Le vocabulaire breton de la ferme (da veza advoullet).

Per Trepos: Grammaire bretonne (Edition Ouest-France): 50 lur (600g)

Leoriou Brud Nevez

An dra reta, evid peb brezoneger « emskianteg », a zo evel just lenn **Brud Nevez**, ha kas e goumanant e koulz. Mez ken red all eo lenn leoriou, evid ar blijadur da genta toud, mez ivez evid heulia ar peb gwella euz ol lennegezh a-vremañ. Kalz a skrivagnerien 'zo, kalz-kalz evid eur yez vihan evel ar brezoneg. Red eo da bep hini ahanoh anavezoud anezo, ha dre-ze, lenn an oll leoriou a embannom.

Deut zo er-mêz daou leor nevez 'zo: eur romant a garantez gand **Diuzed**: « **Lcnaig** »; eur romant a skiant-faltazi, **Cafflogion**, gand **R. Gcrallt Jones**, bet lakeet e brezoneg gand **J. Abasq**. Heb dizonjal leor kaer **K. Brisson**, « **Ar Reder-Mor** » e-neus bet priz kenta **Unvaniez ar Skrivagnerien Vrezoneg**.

Goulennit anezo diganeom: n'ho-po ket a geuz.

Lcnaig: 20 lur (120g); **Cafflogion**: 20 lur (250g); **Ar Reder-Mor**: 20 lur (150g).

Hag ouspenn e skoazelloh ahanom e-keñver arhant. Drastuz eo ar gudenn-ze, dreist-oll p'emaom o paouez prena eur mekanik moulla nevez.

Goulennit ar hatalog.

Trugarez en a-raog.

A. MURSC.

Kavet e vez **Brud Nevez** da brena e ti:

Ar Bed Keltieg, ru ar roue Grallon, Kemper.

Gwalarn, ru des chapeliers, Lannuon.

Breiz, 10, rue du Maine, Paris.

Breiz, 17, ru Pennhoet, Roazon

Kornog, 22, ru ar Vur, Montroulez.

Fañch Broudig

Liberterien

oh embann

eur gelaouenn vrezoneg

BRUG

1913 - 1914

*On digarezit evid an dale. Erruoud a raio al leor gand ar rakprenerien e penn miz mae.
Beteg an 30 a viz mae: 42 lur, heb mizou kas da bêa.*

Bugale Skol Blouhineg

Rouanez ar gorrighed

- gand eun droidigez en esperanto

10 lur (150g)

Leor ar miz

Andreo ar Merzer

Précis de grammaire bretonne

*Dalhet 'z eus bet kont euz an oll rannyezou.
20 lur (250g) evid koumananterien Vrud Nevez.*

da lenn ha da adlenn

NAIG ROZMOR

Karantez ha karantez

barzonegou

18 lur (150g)

PAOTR TREOURE

Mojennou

« Unan euz best-sellerien on amzer »
20 lur (200 g)

JAKEZ RIOU

Geotenn ar Werhez, ha barzonegou
34 lur (200g)

An ti satanazet:

15 lur (200g)

Per-Jakez Helias
Piou e-neus lazet
an hini koz?

5 lur -(50 g)

